

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SARR

gat an Tad BERTHE, Redemptorist,

LAKEAT E BREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEC.

UGENTVED LEORIK.

AR PHARIZIANED

EN HEM ZAVET

A ENEP AR MESSIAS



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

133

ISTORIOU

TENNET EUZ AR SKRITUR - SAKR

gat an Tad DERTHE, Redemptorist,

LAKREAT E DREZOUNEK GAT AN A. SANN,
PERSOUN BANNALEG.

UGENTVED LEORIK.

AR PHARIZIANED

EN HEM ZAVET

A ENEP AR MESSIAS



NEUVILLE-SOUS-MONTREUIL

IMPRIMERIE NOTRE-DAME DES PRÉS

APPROBATION DE MGR LAMARCHE

ÉVÊQUE DE QUIMPER ET DE LÉON.

ÉVÊCHÉ
DE QUIMPER
ET DE LÉON

Quimper, le 25 mars 1892.
En la Fête de l'Annonciation
de la Sainte Vierge.

IMPRIMATUR.

CH. LELEUX, Vic. Cap.

Arras, 25 Août 1892.


Cher Monsieur le Curé,

Les Récits Bibliques du R. P. Berthe, Rédemptoriste, obtiennent un grand et légitime succès. Ce sont des résumés substantiels et admirablement faits de l'Histoire de l'Ancien et du Nouveau Testament.

Vous avez eu la pensée et je vous en félicite, d'en faire bénéficier notre pays Breton qui y trouvera un complément très utile du beau livre *Testament Coz ha Testament Nevez*. Je ne puis donc que vous encourager grandement à poursuivre votre excellent travail de traduction, qui, pour une part très sérieuse, servira les intérêts de la Foi et de la Langue Bretonne dans notre pays.

Croyez, cher Monsieur le Curé, à mes sentiments d'affectueuse estime et d'entier dévouement.

+ THÉODORE, Évêque de Quimper et de Léon.



AR PHARIZIANED

EN HEM ZAVET A ENEB AR MESSIAS

I.

DIEZAMANT.

NEBEUD amzer araok goueliou Pask, Jezus, o velet ar bobl ken douget evitha, a gassas he zaouzek abostol da brezeg rouantelez. Doue dre ar c'heriou hag ar c'heriadennou. Etretant, eur muntr euzuz great gat Herodes a lakeas an holl Galilee e kaon. Euz goueled he brizoun, Iann Vadezour ne ehane da rebec'h dezha he vuez fall. Ar c'hreg fall, Herodiadez, he c'hoar gaer, a veve gat ar roue libertin. Houma, abaoue pell amzer a rea kement a elle evit kaout digat ar roue eur zetans a varo a enep Iann. Hogen, Herodes en devoa diegi ouz her barn d'ar maro abalamour ma zoa mignoun d'ar bobl. Hen her c'harie

ive abalamour d'he zantelez ha meur a vech en doa goulennet kuzul digatha. Herodiades a reas eun taol kaer evit gounid ar roue. Da genver an deiz m'oa ganet, Herodes a roas eul lein vraz d'an holl dud euz he balez ha d'an offiserien euz he arme. Salome, merc'h Herodiades, ker fall hag hi, oajet d'ar mare-ze a drivec'h vloaz a deuas e sal ar fest epad ar pred. Guisket evel eur rouanez, ar brinsez iaouank a deuas, evel eur plac'hik *termajii*, da zansal dirak tud ar palez. Herodes hag he gonsorted a zelle outhi ha ne ellent ket miret da strakal ho daouarn, ker brao e tanse.

« Plac'hik koant, a lavar Herodes, er meaz anezha e unan, goulennit diganhen kement a garfoc'h, me hen roi deoc'h. Ia, emezha, en eur doui, kement a garfot, ha pa ve an anter euz va rouantelez. »

Salome a stouas dirak ar roue hag a redas da c'houlenn kuzul digat he mam.

« Goulen, a lavar ar c'hreg ludik-ma, penn Iann Vadezour. »

Evit n'en devezo ket ar roue amzer da zistrei var he c'her, ar plac'h iaouank a ia dioc'h-tu e sal ar fest, eur plat en he dourn :

« Me' fell d'in, emezhi p'edo e kichen Herodes, e lakafec'h d'in er plat-ma penn Iann Vadezour. »

Herodes a vennas dezha sempla. Mez ag hen a c'helle mankout d'he c'her, d'ar bromessa en devoa touet dirak he holl dud ; ha glac'hari eun danserez ker koant ? Kass a ra eta unan euz he c'hoardou d'ar prizoun, gat urz da zibenna Iann Vadezour. An den santel ne glemmas ket ; eb lavaret eur ger, e c'hastennas he c'houzoug d'ar bourreo. Ar zoudard a droc'has anezha gat eun taol sabren

ha goude beza her lakeat leun-c'hoad var ar plat e kassas anezha d'ar roue hag hema her roas d'ar plac'h iaouank.

Salome a zo mall gathi mont gat an tenzor-ze da gaout ar c'hreg kriz, Herodiades. Brousc'hoarzin a reas ar pezh libertin-ze, evel an diaoulou en iveren. Ker kounnaret oa ma felle dezhi ne vije ket sebeliet korv ar merzer. Hogen, diskibien Iann, a zebelias he gorr hag hen diskennas er bez.

Nebeud amzer goude ar muntr-ze, Herodes a glevas komz euz eur profed all hag a rea burzudou dre an holl vro. Er Galilee, an dud a ioa sabatuet.

Evel n'oa ket trankil aoualac'h he goustians goude kement hen doa great, e sonjas oa an den burzuduz-se Iann Vadezour, deuet a varo da veo, hag e c'hoanteas he vele. Mez Jezus a anavez e den-ze evit eun den kriz ha mignoun da Pharizianed Jerusalem. Pignat a ra eta en eur vag hag en hem denn e gouelec'h Bethsaid. Tec'het a rea dioc'h ar roue, mez ne elle ket tec'het dioc'h ar bobl. Divar an teven, bandennou tud a ioa var-evez evit guele e pe leac'h e vije douaret ar vag, hag a c'hortoze anezha en dezert. Ne ellas ket guele an denved-se e klask ho fastor eb kaout truez outho. Mont a reas gat he ziskibien var eun duichen da azeza, hag ac'hano e komzas epad pell amzer d'an dud keiz-se euz a rouantelez Doue, euz ar rouantelez oa deuet da zevel er bed-ma. Parea a reas ive an holl dud klanv a ioa digasset dezha.

Gouskoude an deiz a ioa var an diskar hag an ebestel a deuas da lavaret da Jezus oa poent braz kass an dud-se d'ar gear. Rak en dezert-ma ne gavint netra da zrebi.

« Ne ket red ho c'hass kuit, a lavaras dezho hor Zalver, c'hui o c'hunan a roio dezho da zribi.

— Mestr, a lavar dezha Philipp en eur vouc'ho-arzin, a pa brenfec'h evit daou-c'hant diner bara, a veac'h ma c'hell'o peb hini kaout eur c'hinaouad.

— Ped bara o c'heus ?

— Mestr, a respount Andre a ioa bet ec'h ober eun droad e touez an dud, etre daouarn eun den iaouank e meus guelep pemp bara eiz ha daou besk. Guelit ag aoualac'h eo ken nebeud-se etre kement a dud !

— Digassit-ho d'in, a lavar hor Zalver, ha grit d'ar bobl azeza a vandennoù a anter-kant pegant. »

Pemp mil den, eb kounta ar merc'hed hag ar vugale a azezas var al letounen. Jezus, neuze, goude beza troet he zaoulagad etrezek he dad, dirak an holl, a vennigas ar pemp bara hag an daou besk. Ho ranna a reas hag e roas he damm da bep hini euz he ziskibien evit kass he loden da bep rumm. Ar bara hag ar pesked a greskas kement ma oue aoualac'h evit an holl. Pa oue echu ar pred, Jezus a lavaras d'he ebestel :

« Brema dastumit ar restachou : rak ne ket mad lezer netra da goll. »

Daouzek panerad restachou oue dastumet, en henvelep fessoun ma krie an holl bete var gern ar menezioù :

« Bevet ar profed braz, ar Roue guirion, a dle savetei ar bed ! »

Eul loden vad euz an dud a c'hortoze chenchamant. Sonjal a reant ha kredi a reant edo ar Mesias, gortozet abaoe kement a vlavezioù, prest da zont da zevel Israel. Ne gafchont eta netra guel-

loc'h da ober eget kinnig dezha ar stur hag ar gurunen, da lavaret eo her lakaat da Roue. Konklui a rejont entrezho o dije kemeret ar profet ha lakeat anezha da roue en despet dezha.

Ar mestr divin, a vel ho zantimant hag a fell dezha miret eun taol ag en dije savet en he enep ar Juzevien hag ar Romaned. Lavaret a reas d'he ziskibien, a ioa var c'hed da eur roue ag a vije bet er bed-ma treac'h d'ar rouanez all, lavaret a reas dezho, mont pelloc'h er mor epad m'hen dije laosket ar bobl da vont d'ar gear. Neuze e zeas var ar menez da bedi.

An ebestel a iea braoik gat ho bag varzu ar c'huz-heol. Mez an noz a ioa tenval, An avel a ioa fall ha krenv. Gourin a rankent gat ho rouenvou ouz ar mor kounnaret. Ken difoun e zea ar vâg m'o doa bet poan ec'h ober, divar bouez ho rouenvou, eul leo anter a vor. Keuz braz o doa defot beza gortozet ho mestr. Setu var-dro peder heur dioc'h an abardaez, e veljont eur spez e tostaat outho a dreuz an dour. Jezus oa, an hini a-bell hag a-dost a veille varnho. Her c'hemeret a rejont evit eur spountaill, hag en hem lakejont da grial.

« N'ho pezet ket aoun, a lavar dezho, me eo a zo ama.

— Mar deo c'hui eo, a lavar Per beuzet er joa, roit d'in konje da vont beteg ennoc'h en eur gerzet var ar mor.

— Deuit, a lavar Jezus. »

Dioc'h-tu, Per a ziskennas euz he vag, var an dour, gat fizians. Mez sevel a reas eun taol avel hag an tarzioù mor en dro dezha a roas dezha aoun :

« Aotrou, emezha, va diouallet. »

Jezus a beg en he zourn hag a lavar dezha :
« Den a nebeud a feiz, perak o c'heus-hu bet doue-
tans ? »

An diskibien a bedas hor Zalver da bignat er
vag hag an avel a dalmas.

« C'hui eo e guirionez map Doue, a lavaront-hi
daoulinet e c'hars'he dreid. »

Pa ziskennas euz ar vag, Jezus a ieas ed-a-ed ar
mor bete Capharnaüm a dreuz ar c'heriou hag ar
c'heriadennou ha dre ma zea e parree kement hini
klarv a elle touch euz he vantel. Etretant, ar bobl
ne c'het maro e klask gouzoud e pe du oa troet Je-
zus, a bignas er bagou deuet euz Tiberiad hag a
dreuzas al lenn evit dont da henvel Jezus evit ho
Roue. Mez Jezus a drouc'has ber d'ho c'homzou ha
d'ho esperans.

« C'hui, emezha, a glask ac'hanon-me ne ket
abalamour d'ar miraklou a ran, mez abalamour
d'ar bara a meus roet deoc'h. E leac'h bara ar
c'horr, klaskit eta ar vagadurez a bado atao hag a
vezo roet deoc'h gat Map an den.

— A petra' ranker da ober ?

— Kredit en Hini a zo digasset gat Doue.

— Mez pe zoare mirakl a rit-hu evit ma kredimp
ennoc'h ? Moizes, hen, a roe d'hon tadou koz
mann an dezert, eur bara diskennet euz an Env.

— Moizes n'en deus morse roet eur bara dis-
kennet euz an Env. Bara an env, ar bara-ze a ro
eur vuez guirion d'ar bed, n'eus nemed va Zad e
c'helloud he rei.

— Kent-a-ze, emezho, roit deamp euz ar bara-ze
ha roit deomp anezha atao.

— Me eo ar bara a vuez. An hini a deu davidon-
me n'en dezo ket mui a naoun hag an hini a gred
ennhon n'en devezo mui sec'hed. Mez, siouaz !
Daoust da gement o c'heus gullet ac'hanon ec'h
ober ne gredit ket c'hoaz ennhon. »

Komzou hor Zalver a lakeas grosimol e touez an
dud : « Hen, emezho, a ve ar bara diskennet euz
an env ! Mez, hennez eo Jezus, map da Jozeph. Ni
a anavez he dad hag he vam. »

Jezus a boursuas : « An hini, emezha, a gred
ennhon-me en deus ar vuez da-viken. Mann an de-
zert n'en deus ket miret ouz ho tadou da vervel.
Mez an nep piou bennak a zrebo euz ar bara dis-
kennet euz an env, hennez ne varvo ket. Hogen,
me eo ar bara diskennet euz an env ; ar bara-ze eo
va c'horr a roan evit silvidigez ar bed. »

Ar grozmol a ieas var gresk pa glefchet ar
c'homzou-ze.

« Penaoz, a lavarent-hi an eil d'egile, e roi hema
d'eomp he gorr da zribi ? »

Jezus ne ra van evit klevet ho c'homzou ha gue-
let ho zantimantchou.

« E guirionez, e guirionez ; me her lavar deoc'h,
ma na zrebit ket euz a gorr Mab an den ha ma na
evit euz he c'hoad, no pezo ket ennoc'h ar vuez.
An neb a zreb euz va c'horr hag a ev euz va goad
en devezo ar vuez da-viken paduz ha me, en deiz
diveza euz ar bed, hen tenno a varo da veo. Rak
va c'horr a zo eur vagadurez ha va goad a zo eun
evach. An hini a zreb eus va c'horr hag a ev euz
va goad a jomm ennhon-me ha me a jomm ennea,
hag er memez mod ma vevan dre va Zad, hen a
vevo dre-zon-me. »

A bep tu e sao grosmol ha klemmou :

« An traoù-ze gouskoude, emezho, a zo diez da gredi ha piou a ell kredi komzou en doare-ze ? » Diskibien Jezus, ha zo-ken ar re vella, a ieas a du gat ar Pharisianed hag enebourien Jezus evit famal he langaj.

« An dra-ma a ra poan deoc'h, a lavar hor Zalver ; ha petra' lavaroc'h eta pa veloc'h Map an den e pignat en envou, he vro genta ? Ar spered eo a ro ar vuez, emezha goudeze, ha ne ket an dribi kig ervez ma sonjit. Ar c'homzou a meus lavaret deoc'h a zo spered-ha buez, mez en ho touez e zeus kalz a no deus ket a feiz ennhon. Rak ouspenn, den ne deu d'in-me ma n'hen deus resevet ar c'hrass digat va Zad. »

Adalek an deiz-se, an darn vuia euz an diskibien a ioa he c'hedal eur rouanteleze euz ar bed-ma, a dec'has dioutha. Jezus a lavaras neuze d'he zaouzek abostol :


« A c'hui, emezha, a kuit e zeoc'h ive ? »

— Aotrou, a respountas Per, a da gaout piou e zaffemp-ni ? Ganeoc'h-c'hui ema ar c'homzou euz ar vuez a bado da viken. Kredi ha gouzoud a reomp e zoc'h ar C'hrist, map an Doue beo. »

Jezus n'oa ket eb gouzoud piou a grede ha piou ne grede ket ; mar komze evel a rea oa abalamour da unan euz an daouzek abostol. Judas Iscariotes, a dlhe her guerza. Evel ne lavare ket eur ger ar reuzeudik-se, ar Zalver a lavaras :

« Me a meus dibabet ac'hanoc'h ho taouzek, ha gouskoude unan ac'hanoc'h a zo eun diaoul. »

Tostaat a rea an amzer fall. An diskibien o deus dilezet ho mestr hag e touez an ebestel zo-ken Satan en deus kavet eun treitour.



II.

PHENISII HA DEKAPOOL.

KER fall oa troet ar sperejou ma ne fellas ket da Jezus mont da Jerusalem evit goueliou Pask. Dilezet evel ma zoa gat he ziskibien, an doktored hag ar veleien no dije ket manket da gregi ennhag hag he heur n'oa ket deuet c'hoaz. An dud fall a en hem unanas evit klask he goll. Deuet int holl da veza mignouned entrezho evit ober brezel dezha, heuil anezha e pebleac'h evit kaout abek en he gomzou hag en he oberou, sevel kassouni outha e touez ar bobl hag erfin her lakaat etre daouarn ar justiss. Gonde goueliou Pask oue mall gatho dont er Galilee. Sellet a reant piz ouz diskibien Jezus hag e veljont abalafin e zeant oc'h taol eb beza goalc'h et ho daouarn. Evit ar Pharisianed, kement-se a ioa eun torfed euz ar re vrassa. Rak int-hi, ne deant morse oc'h taol eb en hem oualc'h-hi meur a vech. Pa zistroent euz kear pe euz an dachen publik, en hem oualc'hent penn-kil-ha-treid. An tassou, ar podou-pri ha zo-ken ar goeleou a vije servichet varnho ar pred, a veze purifiet. Epad ar pred, oa ar c'hiz gatho da lakaat aliez en dour beg ho bizied. Pa zavent dioc'h taol, e lakeant ho dourn en dour beteg

an alzourn. Ervez ho c'hredennou diskiant, an hini ne heulie ket ar c'hiz-se a ioa eskumuget. Kaout a reont abek eta e diskibien Jezus hag an doktored a c'houlennas grouns digatha « perak e zea he ziskibien da breja eb beza goalc'het ho daouarn. »

— A c'hui, petra eo deoc'h, a lavar Jezus, terri lezen Doue, al lezennou sklerra evit heuil gizioù n'ouzor ket euz a be leac'h e tenont ? Daoust a Doue n'hen deus ket lavaret : « Da dad, da vam a enori » ha c'hui, eb ruza gat ar vez, a lavar hag a brezeg d'an dud eo aualac'h dezho, pa vez kuezet ho zad pe ho mam er baourentez; lavaret dezho : « Me a meus goestlet da Zoue va danvez. Kement-se ho saveteo, » ha neuze ar c'hrouadur n'eo mui dleour dezo euz a eun diner. Evelse e lakaat terri gourc'hennou brassa an Aotrou Doue evit ho profit oc'h unan. Hipokrited ! Ac'hanoc'hui e komze Isai pa lavare : « Ar bobl-se a enor ac'hanon-me divar beg an teod ; mez he galoun a zo pell diouzin. An dud-se o deus an doare a zianveaz da glask va gloar ha ne brezegont e guirionez nemed traou ervez ar bed. »

Ar Pharizianed n'oant ket e c'hortoz eur respount ker rust hag a jommas sebezet, eb lavaret eur ger.

« Selaouit holl, a lavaras neuze Jezus, ne ket ar pezh a ia dre ar c'hinou eo a zotr an den, mez ar pezh a deu er meaz anezhi. » Goudeze, en hem den nas kuit.

Ervez prezegennou ar Pharizianed, daouarn a n'int ket goalc'het a zotr ar boued hag ar boued sotret a zotr an den penn-da-benn. Pa deu hor Zalver da lavaret ne ell ket loustoni an daouarn

sotri an den, e tiskare goueziegez ha santelez an doktored-se. Setu perak oue eun tamik emolc'h e touez an dud. An ebestel o deus aoun hag a deu da gaout Jezus.

« Mestr, emezho, ar Pharizianed o deus kavet kalz abek en ho komzou.

— No pezet ket aoun razho, a respountas Jezus. Kement planten n'eo ket lakeat en douar gat va Zad a vezo disc'hriziennet. List anezho da lavaret. Tud dall int e vleina tud dall hag holl assamez e kuezint er foz. »

An ebestel, ken nebeud, no devoa ket ententet mad komzou diveza hor Zalver hag her pedas da eslika dezho he barabolen.

« Penaoz, emezha ! n'oc'h ket evit koumpren e tisken ar boued er c'horv ha, goude ma vez bet malet eno, e vez taolet er meaz ? Er c'hontrol, ar c'homzou a lavar ar ginou a deu euz an ene, ha setu ar pezh a zotr an ene. Euz ar galoun e teu ar sonjou vil, an dezirow fall, an oberou fall, ar muntr, al laeronsi, al libertinaj, ar blasfemoù ; en eur ger an holl dechou fall ha divergont. Setu a-ze ar pezh a zotr an den ha ne ket an dribi eb beza goalc'het an daouarn. »

Ar Pharizianed a ioa imor en ho c'horv hag a glasse ho zro. Jezus a dechas euz ar vro-ze evit eur pennad amzer. Mont a reas a dreuz ar Galilee huella beteg ar Phenisii, var douar Tyr ha Sidon. Eno e karje beza chommet kuzet ; mez ar brud anezha a ioa eat en he raok.

Eur c'hreg euz bro Kanaan a deuas eun deiz d'en hem deuler e c'harz he dreid evit her pedi da ziboania he merc'h, a ioa e galloud an drouk-spered.

« Map David, a lavare-hi, o pezet truez ouzin. Va merc'h a zo goal-gasset gat an droukspered. »

Jezus a rea van da veza bouzar d'he feden, hag he ziskibien a dosteas outha evit diskuez dezha ar vaouez-se.

« Kassit anezhi kuit, a lavarent-hi, ne baouez da grial. »

— Me ne doun digasset ama, a respountas-hen nemed evit oaped dianket a dribu Israel. »

Mez ar c'hreg, daoulinet dirazha, a bedas gat muioc'h c'hoas a nerz.

« Ne ket mad, a lavaras-hen dezhi, kemeret bara ar vugale ha teuler anezha d'ar chass. »

— Kement-se a zo guir, Aotrou; mez ar chass bihan o deus konje da zribi euz ar bruzunachou a guez divar daol ar mestr pe euz a dre daouarn ar vugale.

— Maouez, a lavar dezhi hor Zalver, ho feiz a zo kreñv. Ho peden e deus saveteat ho merc'h. Ra vezo great ervez ma fell deoc'h ! »

Pa zistroas d'ar gear, ar c'hreg-se a gayas he merc'h en he goele, eat an diaoul divar he zro ha pare klok.

Euz ar Phenisii, Jezus a ieas a dreuz ar menezioù, varzu an Dekapool. N'o doa ket ankouna-c'heat c'hoas er vro-ze ar mirakl great gat hor Zalver evit kass an diaoulou euz a gorr eur paour keaz. Setu perak e teue eun niver a dud en dro dezha ha digass a reant a bep seurt tud klañv, tud mut, tud dall, tud kamm, tud seizet. Ho farea a rea holl hag an dud a jomme mantret. Unan a ioa eno bouzar ha mut, Pedi a rear anezha da asten a

zioutha he zourn evit her parea. Hen a lakeas eun nebeudik halo divar he viz e skouarn ar c'hlan-vour en eur lavaret : *Ephpheta*, da lavaret eo : *digorit*.

Raktal e ziskouarn a zigoras ; he deod a ieas endro. Kaer en devoa Jezus difenn outho embann he viraklou, n'oant ket evit miret : « Mad hen deus great peb tra, a lavarent a bouez-penn ; d'ar re vouzar e ro ar c'hleved, d'ar re zall, ar guelede, ha d'ar re vud ar prezek. »

Pa ziouezas e Talmanutha, e tu ar c'huz-heol d'al lenn, e kavas eno ar Pharizianed, deuet en eun taol, da veza mignoun d'ar Sadduseaned, evit ober poan da Jezus. En dro-ma e c'houlenjont digat Jezus ma raje eun dra burzuduz bennak en env. Mez Jezus ne falvezas ket dezha rei dezho ar pez a c'houlennent : « Pa deu an abardaez, emezha, ma velit ruz ar c'hoabr e livirit e-vezo kaer an amzer antronoz. Dioc'h ar mintin, ma vez tenval an amzer ha liou an tan varnha, c'hui a lavar e vezo goal-avel. C'hui a oar dioc'h sinou an env hag a zianavez sinou an amzeriou brema. Nan, nan, emezha en eur huanadi, ar rumm-dud fall-ma a c'houlenn eur sin ; n'hen devezo ken sin nemed hini ar profed Jonas. »

Goude beza komzet evel-se, e pignas er vag hag e zeas en tu-all d'al lenn. Epad ma oant e treizia, e kelenne c'hoaz he ziskibien. « Diouallit mad, emezha, oc'h ouell ar Pharizianed, ar Sadduseaned hag an Herodianed. » Pa glefchont ar gomz : « Ouell » e teuas da zont dezho no doa tam bara hag e kredchont e rea dezho hor Zalver eun nebeudik rebech. « Tud a nebeud a feiz, a lavar hen dezho, ne

zonjit nemed e bara ar c'horv. Pa meus rannet pemp bara etre pemp mil den, ped panerad a zo chommet a zilerc'h ?

— Daouzek, emezho. — Ag e c'hellec'h sonjal oa menek ganen-me euz a vara ar c'horv pa lavaren deoc'h dioual rak goell ar Pharizianed ? »

Güelet a rejont nêuze e komze hor Zalver euz skol fall ar Pharizianed.



III.

TRAOU DUDIUZ.

DEUET oa ar mare da gentelia an ebestel var bouez ar burzudou a ioa var nez beza great. Jezus a ias gatho varzu bro Sezaree, hag en eur ober hent e c'houlennas digatho :

« Petra' lavarer e touez an dud, euz Map an den ?

— Aotrou, emezho, lod ho kemer evit Iann Vadezour, darn all evit Elias, lod all evit Jeremias pe unan all bennak euz ar profeted braz deuet a varo da veo.

— A c'hui, emezha, evit piou hem c'hemerit ?

— C'hui, Aotrou, a lavar raktal Simoun-Per ha gat nerz ; c'hui eo ar C'hrist, Map an Doue buezek.

— Eüruz-tre oud, Simon map da Jonas ; rak n'eo

ket ar c'hik nag ar goad eo o deus desket kement-se did, mez va Zad pehini a zo en env. Ha me a lavar did e zoud Per, da lavaret eo mean, ha var ar mean-ze me a zavo va iliz hag holl dorêjou an ivern ne vezint morse treac'h dezhi. Deoc'h e roin alc'hoeziou rouantelez an env. Kement o pezo liammet var an douar a vezo liammet en env ; ha kement o pezo diliammet var an douar a vezo diliammet en env. »

Dre ar c'homzou-ze, Jezus a zisklerie sklear oa Doue hag e lakea Per e penn he iliz. Goudeze, e tispakas dirak ho daoulagad mister ar Redampson n'he anavezent ket c'hoaz. Goude beza lavaret dezho grouns tevel ha chomm eb lavaret da zen oa hen ar Messias gat aoun na vije he enebourien en hem zavet outha araok ar poent, e tisklerias dezho e tlie mont a ben nebeud da Jerusalem hag en dije eno Map an den kalz poan da c'houzaon. Dianavezet gat ar re goz e touez ar bobl, gat prinsed ar veleien, gat ar skribed hag ar Pharizianed, e tlie beza lakeat d'ar maro ; mez d'an trede deiz e tlie dont euz a varo da veo. »

Dre ar c'helou truezuz-se, Jezus a lakeas tristidigez e kaloun he ziskibien. Ar re-ma a ioa var c'hed euz a eur rouantelez euz ar bed-ma hag ema kollet gatho peb esperans. Per a denn he vestr a gostez hag a lavar dezha krenn e tlie en hem gemer er fessoun all pa zeo guir oa he c'halloud treac'h d'he holl inimied. « Arabad e ve, Aotrou, great deoc'h ervez o c'heus lavaret ». Per a oue digemeret fall. Jezus a lavar dezha grouns : « Teac'h diouzin, Satan, gat da dentasionou. Guelet a res an traou ne ket ervez Doue, mez ervez ar bed. Ka-

ret a rez ne ket traou an env mez traou an douar.»

Gervel a ra en dro dezha ar bobl gat he ziskibien hag e lavar eur vech c'hoaz ar pez en deus diskleriet divar benn he bassion : « Mar deus unan bennak ag en deus c'hoant da zont d'am heul, n'en deus nemed renons dezha he unan, samma he groaz ha dont var va lerc'h. An nep piou bennak a falvezo dezha savetei he vuez, he c'hollo; mez an hini a ginnigo he vuez evidon-me hag evit an aviel a zavetei anezhi. Hogen, petra zervich d'an den gounid ar bed holl mar teu da goll he ene? A petra ello rei e leac'h an ene-ze kollet? An nep piou bennak a ruzio abalamour d'in-me dirak an dud-ma fall ha dizoue, Map an den en devezo mez gatho ive pa ziskenno e gloar he Dad ha e touez he elez darenta da bep hini ervez he oberou. »

Eiz dervez goudeze, Jezus a gemeras gatha Per. Jakez ha Iann hag ho c'hassas da bedi var eur menez huel. Eno, epad ma zoa kousket mad an tri abostol ker skuiz oant, Jezus en hem laka da ziviz gat he Dad. Peger mantret n'ouent-hi ket pa ziun-jont? Jezus a zo dirazho transfiguret, chenchet drem ha doare gatha. He vizaj a zo skeduz evel an heol; he zillad a zo guenn-kann evel an erc'h. Daou zen, kaer, diskennet euz an env, Moizes hag Elias, a gomze gatha divar benn he varo hag ar poaniou en dije da c'houzaon e Jerusalem.

An ebestel souezet-holl o doa plijadur e sellet outho. Pa edo Moizes hag Elias e vont da gimmiada e kreiz eur goabren skeduz, Per, er meaz anezha e unan, he galoun teuzet er joa, ne ell miret da lavaret da Jezus : « Mestr, ama eo mad beza. Mar kirit, ni a zavo ama tri del, unan evidoc'h, unan

evit Moizes hag eun all evit Elias. » Ne ouie ket kalz petra lavare. Euz ar goabren oue klevet neuze eur vouez e tont hag ar vouez a lavare : « Hema eo va Map muia karet, an hini a meus lakeat ennha va holl fljadur, Selaouit anezha. » Pa glevont ar c'komzou-ze, an diskibien a guezas d'an douar var ho fenn. « Savit a lavar Jezus dezho en eur douch outho gat he zourn, ha bezit eb aoun. » Pa zavont en ho za, kaer o devoa sellet en dro dezo, ne velont nemed Jezus. Echu oa ar mirakl.

Jezus en devoa her great evit startaat anezho er feiz, d'ar mare-ze ma komze dija dezo euz he bassion. Evelse e lavaras dezo dioual da lavaret ger da zen euz ar pez o doa guelet ken na vije savet a varo da veo.

Antronoz, e traoñ ar menez e kavas he ziskibien all. En dro dezho oa bodet eun niver braz a dud hag a skribet e tisput outho. Ar bobl, pa vel Jezus e tont a ia dre respet d'he ziambrouk ha d'he zaludi. Dioc'h-tu e c'houlen outho divar benn petra edo an diviz etrezho.

« Mestr, a respountas unan anezo en eur zaoulina e c'harz he dreid, digasset e meus va map d'ho kaout. Possedet eo, siouaz ! gat eun diaoul mut. Ne meus ken krouadur nemetha. O pezet truez outha, m'ar plij, rak poan skrijuz en deus. Dioc'h ma vez al loar e teu he varrajou dezha. Kueza'ra en dour; kueza'ra en tan. Pa den ar spered fall da gregi ennha ha d'he deuler a stok he gorr d'an douar, e teu an ionen en he c'hinou hag e strak he zent. Pa za kuit ar spered, e chomm evel malet hag anter varo. Digasset e moa anezha dirak ho tiskibien evit he barea. Mez n'o deus ket gellet hen ober.

— O ouenn dud diskredik ha fall, a lavar Jezus, pegeit c'hoaz e c'hespennin-me ac'hanoc'h ? Digasit d'in ar c'hrouadur. »

Kerkent a ma velas Jezus, ar spered a bilas adarre ar c'hrouadur hag-a ruias anezha ken na ioe-nenne.

« Pegeit'zo ema klañvevelse, a c'houlennas Jezus ?

— Abaoue he vugaleach, a lavaras an tad. Ar spered, aliez, evit he laza, a daol anezha en dour pe en tan. Dre druez, Aotrou, mar gellit, sikourit ac'hanomp ! »

Jezus a lavaras dezha : « Peb tra a zo possubl d'an hini a gred. A Kredi a rit-hu ?

— Ia ; kredi a ran, a lavar an tad gat forz dae-lou : hogen kreskit ennhon ar feiz. »

Ar bobl a zirede a bep-tu. Jezus a c'houerdrouzas ar spered drouk-se hag a lavaras dezha grons ha seac'h :

« Spered bouzar ha mut, me her gourc'hemen d'id, kerz er meaz euz ar c'hrouadur-ze ha dioual na zistroi mui ennhon. »

Ar spered a laoskas eur griaden spountuz hag, araok tec'het, a ejas kement ar c'hrouadur ma chommasa stok he gorf ouz an douar evel maro.

« Maro eo, a lavaret a bep-tu. » Mez Jezus a begas en he zourn, a zavas anezha goustadik hag ar potr a ellas chomm e unan en he za. Pare oa. Ar bobl a ioa souezet o velet peger braz eo galloud an Aotrou Doue, a rente meuleudi d'ar profed ha ne ouie ket penaoz diskuez dezha he anaoudegez vad.

Treuzi a rejont goudeze ar Galilee evit distrei da Gapharnaom. Jezus a dec'he diouz ar bobl ; mez e pebleac'h e vije digemeret gat ar brassa levenez : ar

pez a roe kalz joa d'he ziskibien. Rak ar re-ma o doa mall da velet anezha e sevel he rouantelez var an douar. Evit ho difazia, Jezus ho c'helenne dre ar c'homzou-ma : « Lakit doun en ho kaloun, emezha, va c'homzou. Map an den a vezo lakeat etre daou-arn ar bec'herien hag ar re-ma her lakai d'ar maro ; mez d'an trede deiz e teui euz a varo da veo. »

Selaou a reant he gomzou eb ho c'hompren ; gouskoude ne gredent ket goulenn digatha skleri-jen hag ar virionez e dije marteze ho lakeat da fall-galoni.



IV.

JEZUS A GUITA AR GALILEE.

C'HUEC'H miz araok he bassion, Jezus a i eas da Jerusalem petra bennak edo eno oc'h he c'hortoz d'her lakaat d'ar maro he holl ini-miët en hem zavet a-unan. He zonj oa kuitaat bro dianaoudek ar Galilee ha mont da brezeg he aviel dre ar Judee hag ar vro a zo en tu-all d'ar Jourden. Ne lavaras ger d'an ebestel var ar pez a dlhe ober hag e tiskennas gatho etrezek ar Samarii. Pa edo e vont da chench bro, e ra eur zell a druez var ar c'heriou hag ar c'heriadennou-ze eo bet enn-

ho ken aliez a vech; e sonj en eneoù paour-ze gu e chall ker santel ha brema ker kaledet :

« Maleur, deoc'h, Korozañ; maleur, deoc'h, Bethesda ! a lavaras-hen, en eur zistrei varzu ar c'he-riou reuzeudik-se. Tyr ha Sidon, ma vije bet great enno kement a vuzudou evel o c'heus-hu guelel, o dije great pinijen el ludu hag er c'houriz-reun. Setu perak, deiz ar varn, ne vezor ket ker rust evit Tyr ha Sidon a ma vezor evidoc'h. A te, Kapharnaom, savet gat Doue beteg an en'v, te a goezo beteg en ifern ! »

Araok kourmans labour braz he vission, e tibabas e unan daouzek diskib ha tri-ugent da vont a bep-tu da brepar an hent evitha. Eun niver braz a ioa bet ec'h en hem ginnig dezha ha ne ouent ket kavet mad. Unan anezho a felle dezha heuil Jezus e peb leac'h; mez pa lavaras Jezus dezha : « Allern o deus ho c'heo hag al laboussed ho neiz; hogen map an den n'en deus ket eul leac'h da joucha varnha he benn », an dienez-se a reas dezha kiza. Eun all, araok mont da heul Jezus, a ranke, emezha, mont da zebelia he dad. « List ar re varo da zebelia ho re varo, a lavaras dezha Jezus. » Eun all c'hoaz en doa c'hoant da vont da lavaret kenavo da dud he di : « An neb piou bennak, a lavar Jezus, a grog en alar hag a dro kein dezha goudeze da zellet var he lerc'h n'eo ket mad evit rouantelez Doue. » Kass a reas d'ar gear an tri zen-ze a ioa var var. An daouzek ha tri-ugent all a oue kasset daou ha daou el leac'h m'hen doa sonj da vont da gass kelou mad an aviel. Rei a reas dezho galloud da brezeg ha da barea ar re glañv.

Pa errujont er gear genta euz ar Samarii, kan

naded hor Zalver oue difennet outho lakaat ho zreid er vro. Jakez ha lann a c'houlenne dija ma vije koezet tan an en'v var ar gear-ze. Jezus a rebechas dezho e c'honlennent re : « Map an den, emezha, ne ket deuet da goll an eneoù, mez d'ho zavetei. »

Eleac'h mont a dreuz ar Samarii, e kemeras traoñien ar Jourden. Dre an hent-se e zeas da Jerusaleim en eur dremen dre Jeriko.

Gouel an teltou a ioa tost ha kerent Jezus hen alie d'en hem ziskuez en templ evit startaat he ziskibien en ho feiz dre ar guel euz he viraklou. « Den, emezho, ne labour e-kuz, mar fell dezha beza anavezet gat an dud. Ma rit miraklou, grit anezho dirak ar bobl. » Jezus a ioa he zonz mont d'an templ, mez d'an deiz ha d'an heur a blije dezha. « Va amzer, emezha, ne ket deuet c'hoaz; mez evidoc'hui, n'euz ket amzer dioc'h amzer. Rak ar bed n'en deus ket a gassonni ouzoc'h. Ouzin-me avad hen deus kaz abalamour ma tizoloan he oberou fall. It eta d'ar gouel; mez evidon-me ne dan ket ganeoc'h, » hag e poursuez he hent a ed ar Jourden.

E kichen Jeriko, eun doktor a deuas d'he denti hag a lavaras dezha :

« Mestr, petra rankan-me da ober evit kaout ar vuez eternal ?

— Petra' lennit-hu el lezen ?

— Karet a reoc'h an Aotrou, ho Toue, a greiz ho kaloun, euz ho c'holl ene, euz ho c'holl nerz hag ho nessa eveldoc'h oc'hunan.

— Mad o c'heuz respountet; grit kement-se hag e vevot.

— Mez piou evel-se eo va nessa ? »

Jezus a lavaras neuze d'an den ourgouilluz-se :

— « Eun den a ziskenne euz a Jerusalem mont da Jeriko pa guezas etre daouarn al laëron. Ar re-ma a dennas digatha kement munu-mad en doa gatha ha goude beza her bronduet e lezont anezha anter-varo var an hent. Eur belek her guelas hag ieas a-biou ; eul levit a dremenais ive dre'n hent-se ha ne reas van evit her guelelet. Mez eun den euz Samarii, pa her guelas, en devoue truez outha. Tostaat a reas outha, bandenna' reas he c'houliouha skuilla'reas varnho oleo ha guin. Neuze e pignas anezha var he varc'h hag e kassas anezha beteg an ostaleri dosta hag e kemeras peb soursi anezha. Antronoz e roas daou bez arc'hant d'an ostiz, en eur lavaret : « Kemerit soursi euz an den keaz-ma. Ar pezh o pezo dispignet ouzpenn evitha, en distro, me her paeo deoc'h. » Pehini euz an tri zen-ze a gav deoc'h a zo bet nessa an den anter lazaret gat al laëron ?

— Eb douetans ebed, an hini en deus bet truez outha.

— Mad ; it ha grit evel dha. »

E Bethanii hor Zalver a loias e ti Lazar hag he ziu c'hoar, Martha, ha Mari. Houma, pec'herez koz Magdala, a ioa abaoe he c'honversion leun a garantez evit Doue. Chomm a rea e c'harz treid hor Zalver evit klevet he gomzou. Martha, avad, a gemere kalz poan evit farda dezha he bred.

« Aotrou, a lavarais-hi abalafin, va c'hoar a lez ac'hanon-me va unan da labourat. Livirit eta dezhi dont d'am zikour.

— Martha, Martha, a respountas hor Zalver, kalz poan ha kalz nec'hamant a gemerit gat e-leiz

a draou. Hogen eun dra ebken a zo ret. Mari e deus choazet al loden vella ha ne vezo ket ten-net digathi. »

Pa erruas var gorre menez Olivet, e kavas eno he zaouzek-ha-tri-ugent diskib, var c'hed dezha, en distro euz ho mission. Laouen braz oant. « Aotrou, emezo, an diaoulou zo-ken a zent ouzomp en oc'h hano-c'hui. » — « Ia, a respount dezho Jezus, guelet a rean Satan e kueba euz an envevel eul luc'heden. Deoc'h e meus roet galloud da vale var ar c'hruged hag ar sarpanted eb kaout drouk. Diouallit da gemeret foug abalamourma sent ouzoc'h ar sperejou. Mez bezit laouen abalamour o c'hanoioa a zo skrivet var leoriou ar baradoz. — Va Zad, emezha goudeze, me ho trugareka da veza kuzet an traou-ze euz an doktored hag an dud a skiant vraz ha da veza ho diskuliet d'an dud dister. Den ne oar petra eo an Tad nemed he vap ebken, ha kement hini a blijo gat ar Map hen diskleria dezha. » Distrei a ra neuze varzu he ziskibien hag e lavar dezho : « Eüruz an daoulagad o deus guelet ar pezh o c'heus guelet. Me her lavar deoc'h ; kalz profeted ha kalz rouanez o deus bet c'hoant da velet ar pezh a velit ha n'ho deus ket guelet ; c'hoant de glevet ar pezh a glevit ha n'ho deus ket klevet. »





GOUEL AN TELTOU.

GOUEL an teltou pe an tabernaklou a zigasse da zonz d'ar Juzevien euz ar burzudou en devoa great an Aotrou Doue evit ho zud koz, epad m'edont dindan an teltou en derti. Epad an eiz dervez ma padé ar goueliou-ze, an Israelited a loje en-dro d'an templ dindan teltou savet gat brankou glaz. Ac'hano, e zeant d'an templ da gana : *Alleluia*, brankou palmez en ho dourn. E douk ar zizun penn-da-benn e veze kinniget da Zoue kalz loened e sakrifis ha var an aoter a binijen e vije lakeat kalz prof.

Ar goueliou kaer-ze ne eljint ket moug a kaloun ar Pharizianed ar gounnar o devoa oc'h Jezus. Fel-loud a rea dezho, kousto pe gousto, paka anezha da genver ar goueliou-ma ha klask a reont anezha a bep tu. N'oa ket diez he gaout. E tonez ar bardounerien ne oa ken kaöz nemed divar benn Jezus. Lod a lavare oa euz a berz Doue; darn a lavare ne oa nemed eun istrogel e trompla an dud. Ar rumm diveza-ma a dud oa a rea ar muia trouz evel ma c'hoarvez atao, ha mignouned Jezus ne lavarent ger gat aoun da veza tamallet ha goal-gasset gat ar Pharizianed.

Kredi a reat ne vije ket pignet Jezus bete Jerusalem, pa oue an holl souezet e velet anezha deiz ar

gouel e vont d'an templ hag oc'h en hem lakaat e plass evit prezek d'ar bobl. Kerkent, mignouned hag inimied, Sadduseaned ha Pharizianed, beleien ha doktored a vodas en-dro dezha, lod evit kaout kaer ar pezh a lavare, lod all evit kaout abek.

N'hen doa ket prezeget epad pell amzer ma oue sabatuet ar bobl ha ma klevet tud e lavaret : « Pennaoz e c'hell gouzoud ker kaer ar Skritur Sakr, eb beza jamez hen desket ? » N'oa ket bet er skol, n'hen devoa bet nep mestr. Jezus a ro da entent dezho hen deus ar c'houeziegezh-se evel Doue.

« Ar gelennadurezh a roan deoc'h ne ket ac'hannon-me eo ; me-meus he resevet digat va Zad pehini a zo en env. Ma raffec'h bolontez va Zad, e velfec'h prestik e teu ar gelennadurezh-se digat Doue. E maoc'h atao gat lezen Moizes ha ne baouezit da rebech d'in e torran al lezen-ze. Var an digarez-se e klaskit va lakaat d'ar maro ha gouskoude c'hui oc'h unan ne virit ket al lezen.

— Piou eta, a gri unan bennak, a fell dezha ho lakaat d'ar maro ? Red e ve an diaoul en ho korv. »

Jezus a respontas : « Eun dervez sadorn e meus great eur mirakl hag oc'h eat holl e kounnar ; c'hui gouskoude a ra ar sirkonsizion d'an deiz-se. Perak e zit-hu en egar abalamour ma meus pareet eun den klanv ? »

Ar Pharizianed ne c'houient petra da lavaret. Keriz Jerusalem n'oant ket eb gouzoud ar pezh a glasket ober d'hor Zalver hag a c'houlenne entrezoperak e lezet kement kabestr gantha da brezeg. « A n'e ket ema, emezho o deus c'hoant da lakaat d'ar maro ? Petra eo eta ma lezer anezha da brezek e publik, eb ma klask den miret outha ? Daoust a

prinsed ar veleien o deffe he anavezet evel Doue ? Gouskoude ni a oar euz a be leac'h e teu an den-ma ha den ne ouezo euz a be leac'h e teu ar C'hrist.

— Gouzoud a rit piou oun hag euz a be leac'h e teuan, a respount Jezus. Hogen ne anavezit ket an hini en deus va digasset. Me hen anavez ; rak anezha e teuan hag Hen eo en deus va digasset. Va c'hask a reot ha n'hem c'haffot ket. Rak el leac'h ma vezin ne elloc'h ket dont. »

Ar darn vuia a grede enna. Rak evel a lavarent, ar C'hrist ne-elle ket ober muioc'h a vuzudou eget hema. Kement-se a lakeas da egari pennou braz ar C'honsel ken na gaschont tud da gregi enna. An eizved dervez oa euz ar gouel hag ive an diveza. Goude ar sakrifik great dioc'h ar mintin, eur belek a ieas, evel kustum, da feunteun Siloe gat eur pod aour da gerc'het tri muzulad dour. Pa zeo pignet en templ, e skuill an dour-ze e c'harz Aoter ar Binijen e memor euz an dour mirakuluz en doa lakeat Doue da darza euz ar garrek, er gouelec'h. D'ar poent-se Jezus, en he za, a lavar dezho : « An nep piou bennak en deus sec'het, n'en deus nemed dont daved-hon. An hini a gred ennhon-me, a redo euz he gov eienennou dour beo, ervez ma lavar ar Skritur. » Hor Zalver a gomze euz ar Spered Santel a dlise disken divezatoc'h var ar guir ziskibien.

Euz an dud a ioa eno, lod a lavare : « Hema a zo eur profed braz. — Ar C'hrist eo, a lavare lod all. — Daoust ag ar C'hrist a deuio euz ar Galilee, eme ar re habil var ar Skritur ? A ne ket merket e tiskennno euz a lignez David hag euz a vourk Bethlehem ? » He inimied a ioa en-dro dezha ; mez den ne gredas

teuler he zaouarn varnha. Ar gouardou a zistroas mezek d'ar gear da gounta ar pezh a ioa bet c'hoarvezet.

« Perak n'o c'heus-hen ket digasset ama, a c'houlpen prinsed ar veleien hag ar Pharizianed ?

— Perak ? emezo ; abalamour morse d'en n'en deus komzet evel ennes.

— Petra ! Daoust a c'hui a ve touellet ive gatha ? E touez prinsed ar veleien hag ar Pharizianed, a kaout a rafec'h unan ebken ag a gredfe enna ? A mont a reoc'h ive da heul ar bobl munud-se ne anavez ket al lezen hag a zo mallozet gat Doue ? »

Kement a zrouk a-ioa enna, ma edont e vont da leusker an eskummunugen var Jezus ha da rei urz dezha da dec'het euz ar vro. Mez unan euz pennou braz ar Sanhedrin, Nicodem, an hini a ioa bet en noz, daou vloaz a ioa, e tiviz gat hor Zalver, en hem zavas a eneb eun henvelep injustiss.

« Ne ellit ket ober kement-se, emezha. Daoust ag ho lezen a ro konje da varn eun den eb he gle-vet, eb beza klasket petra en deus great ?

— Sell-ta ! m'ez aoun oc'h ive Galilean ! emezho dre c'hoaperez. Mad ! Troit ha distroit ar Skrituriou hag e veloc'h ne deu ket eur profed euz ar Galilee. »

Var gement-se e tistrojont peb hini d'he di eb beza great netra a eneb Jezus ; hogen, ne zaleint ket.





VI.

AN DEN GANET DALL.

ANTRONOZ ar gouel, epad m'edo Jezus en templ e kelen eun niver braz a dud, ar skri-bed hag ar Pharizianed a zigassas dezha eur c'hreg ak a ioa bet paket oc'h ober ar pec'hed.

« Mestr, emezo, lezen Moizes a c'hourc'hemen laza ar c'hreg-ma a daoliou mein; ha c'hui petra' livirit ? »

Ar goulèn-ze a ioa eun taol finessa. Rak ma tifen Jezus he laza, e vezo tamallet da vont a eneb al lezen; mar fell dezha eve lakeat d'ar maro, e vezo tamallet ive evel eun den kriz. Rak pell a ioa dija oa eat al lezen-ze d'an traoñ.

E leac'h respount dezo var eeun, Jezus, daoubleget, a skriv gat he viz var ar boultren. Ar re hen tamalle a ell kredi e verke eno ho hanoiou evel ma tlie ober peb barner araok klevet an testou. Inoui a reant, hag e lavarjont dezha hasta affo. Jezus a zao neuze sounn hag en eur ober eur zell varnho e lavar :

« An hini ac'hanoc'h a zo direbech, ra deui da deuler outhi ar mean kenta ! »

Daoubleget, e skriv adarre var ar boultren. En dro-ma, e sonje dezo edo e skriva ho fec'hejou; ha

setu hi da ziskampa ac'hano sioul; ar re gossa da genta. Jezus a jomme e unan var al leac'h. Ar c'hreg a ioa en he za dirazha. « Maouez, emezha, e pe leac'h ema ar re a damalle ac'hanoc'h ? Den n'en deus ho lakeat d'ar maro ? Na me n'rin ket ken nebeud. It e peoc'h ha ne bec'hit mui. »

Eur vech all, evit diskuez e zoa Doue, e lavare evelhen. « Me eo sklerijen ar bed; an hini a deu d'am heul n'e gerz ket en denvalijen. »

Ar Pharizianed a lavaras dezha ne dlle ket renta testeni anezha e unan. Jezus a respountas : « Daoust ma tougan testeni ac'hanon va unan, va zes-teni a zo guir. Rak gouzoud a ran euz a be leac'h e teuan ha da be leac'h e zan. C'hui avad ne ou-zoc'h ket euz a be leac'h e teuan. Rak ne varnit nemed ervez ar c'hik. Ouspenn-ze ne maoun ket va unan. Rak en eur zigass ac'hanon ama va Zad en deus roet d'in galloud da ober burzudou hag a rent dre-ze testeni d'in. Hogen, ervez al lezen, testeni daou zen a zo aoualac'h. » Neuze e c'houlenjont digatha e pe leac'h edo he dad evit ober dezha dis-kleria oa Doue ha gelloud hen tamall evel blasfema-tour. Mez Jezus a vele ho finessaou.

« Ne anavezit, emezha, na va Zad na me. Ma o pije anavezet mad ac'hanon-me, o pije ive anave-zet va Zad. »

Eun droiad-all, e c'hourdrouzas anezho da vervel en ho fec'hed : « E maoun e vont kuit, emezha; va c'hask a reoc'h ha n'hem c'havot ket ha mervel a reoc'h en ho pec'hed. Ia; ma ne gredit ket ennhon, e varvoc'h en ho pec'hed. »

— Mez piou oc'h c'hui, emint-hi ?

— Ar pezh a lavaran deoc'h abaoue ar penn kenta ?

Pa o pezo savet mab an den divar an douar, neuze e uezoc'h piou ounn ha ne ran netra ac'hanon va unan, mez e komzan atao a-berz va Zad.

« Dale hit mad d'am c'homzou, a lavar-hen d'an dud vad a ioa en dro dezha, hag e vezoc'h e guirionez va diskibien. Anaoud a reoc'h ar virionez, hag ar virionez ho tenno a sklavaj.

— A sklavaj, eme ar Pharizianed, drouk ennhio ? Ni a zo euz a ouenn Abraham ha n'eus ket eur sklav en hon touez.

— E guirionez, e guirionez, m'her lavar deoc'h, eme Jezus, an hini a ra ar pec'hed a zo sklav d'ar pec'hed. Pa vezoc'h bet tennet a sklavaj gat map Doue, neuze e vezoc'h, e guirionez, libr. Mar d'oc'h bugale Abraham, grit evel Abraham. C'hui a fell deoc'h va lakaat d'ar maro abalamour ma lavaran deoc'h ar virionez. Abraham n'en deus ket great evel-se. C'hui ne rit nemed oberou ho tad.

— Hon tad-ni eo Doue, a leverjont en eur ioual.

— Ma vije bet Doue ho tad, a respountas Jezus, c'hui o pije karantez evidon. Rak me a zo deuet a Zoue evit diskenn beteg ama. Mez ho tad, deoc'h c'hui eo an diaoul, an hini a zo bet bepred muntrer. Heñ eo a laka fourradennou en ho penn. Gaouiad eo ha tad ar geier. Outha e sentit. Me a lavar deoc'h ar virionez ha n'hem c'hredit ket. Gouskoude piou ac'hanoc'h a ell tamall d'in-me an disterra pec'hed ? Mez ne zelaout ket ac'hanon abalamour ne maoc'h ket a du gat Doue hag eur maleur braz eo evidoc'h ; rak an nep piou bennak a vir va c'homz, a vevo da viken.

— Evit-outha, emezho, ne dout nemed eur Samaritan hag eun den possedet gat an diaoul. Abraham

a zo maro ; ar profeted a zo maro ; ha te a lavar ne varvo biken an hini a viro da lezen ! Neuze ta te zo brassoc'h eget Abraham hag ar profeted ? Eur vech c'hoaz, piou out-te ?

— Ma en hem veulan va unan, a respountas Jezus, va meuleudi ne dal netra. Va zad eo, an hini a hanvit ho Toue, eo a ra va meuleudi. C'hui n'hen anavezit ket. Me hen anavez ha ma lavarfen n'hen anavezan ket, e vefen henvel ouzoc'hui, eur gaouiad. Abraham, ho tad koz, en deus c'hoanteat a holl galoun gueleit va dervez-me. He velet hen deus hag eo maro laouen.

— N'e c'heus ket anter kant vloaz, a lavarent en eur c'hoapaat, hag e c'heuz gueleit Abraham !

— E guirionez, m'her lavar deoc'h, eme Jezus, me a ioa araok Abraham ! »

An dra-ze a ioa lavaret dezho sklear oa Doue. Ar Pharizianed ne badent ket gat ho imor. Dastum a rejont mein evit laza ar blasfematour. Mez Jezus a dec'has a douez ar bobl hag a ieas er meaz euz an templ. Gouskoude, araok kuitaat Jerusalem, e fel-las dezha diskuez dre eur mirakl braz edo gatha ar virionez.

E kichen an templ, e vije atao eun den ag a ioa dall abaoue m'oa ganet. Eno e c'houlenne an aluzen. An holl hen anaveze. Jezus a dosteas outha, a granchas var eun tam poultren ha gat ar pri-ze e c'holpaz dezha he zaoulagad hag e lavaras : « It d'en hem oualc'hi e pinsin Siloe, er c'hrestreiz d'an templ. » An den dall a ieas, en hem oualc'has hag a zistroas pare ha laouen.

Kerkent, emalc'h er c'harter. He amezeien ha kement hini a ioa boazet da rei dezha an aluzen, o

doa poan e kredi ar pezh a velent : « A n'eo ket ennez an dall a velemp azezet e kichen an temple e c'houlenn an aluzen ? Ennez eo ; zur, a lavar lod. — N'e ket ennez eo, a lavare lod-all. — Henvel eo outha, mez ne ket hen eo. »

— « Me va unan eo, a lavar an dall, ha nan eun all. »

— « Penaoz eo bet digoret d'id da zaoulagad, a c'houlenn an dud ? »

— « An den-ze a zo hanvet Jezus en deus frottet anezho d'in gat pri, en deus kaset ac'hanon d'en hem oualc'h e pinsin Siloe. Di oun eat, en hem oualc'h a meus great ha setu e velan sklear. »

Ar bobl, pa glevas hano Jezus, a ioa e vont da grial gat ar joa. Mez tud ar Sanhedrin a ioa eno ha gouzoud a reat petra' ioa e c'hortoz ar re a ioa a dugat ar profed. Gat aoun, e chomjont sioul. Lod evit ober al lez d'ar Pharizianed a c'houlennas digat an dall e pe leac'h edo Jezus. Mez hema ne ouie ket lavaret dezho e pe leac'h edo e chomm ha setu hi e kass anezha dirak an doktored. Digor oa ar zadorn d'ar poent m'oa great ar mirakl. Setu adarre eun abek evit ar Pharizianed da damall Jezus. Ar varnerien a c'houlennas digat an hini dall penaoz oa bet pareet :

« Pri en deus lakeat d'in var va daoulaged, emezha, eat oun goudeze d'en hem oualc'h hag oun pare. »

Setu eur burzud a ne ellet ket nac'h ; mez a dont a rea a berz Doue ? Darn a lavare ne elle ket ar mirakl-se dont a berz Doue, abalamour Doue ne c'hell ket rei kement a c'halloud da eun den ag a dorr lezen ar zadorn. Ar re all, eun tam furroc'h,

a c'houlenn penaoz eur pec'heur en dije gellet ober seurt burzudou.

« A te, a leverjont d'an den dall, petra' zonjes da unan euz an hini en deus digoret d'id da zaoulagad ? »

— Me, emezha var eeun, a gred e zeo eur profed. » N'oa ket aoualc'h evitho testeni an den dall ; marteze oa bet tromplet, marteze paet evit lavaret geier. Red oa eta ober enklask. Kemennet oue d'he gerent dont dirak ar barner hag oue goulennet tri zra digatho :

« Ag hennet eo ho map ? A ganet eo dall ? Mar deo ganet dall, penaoz effen deuet da velet sklear brema ? »

Int-hi a respontas a-grenn. « An den-ze eo hor map ha ganet eo dall. Penaoz e vel brema, piou en deus digoret dezha he zaoulagad ? Var ar poent-se n'oump evit lavaret deoc'h netra. Ouspenn zo. Ar potr a zo en oad. Goulennit digatha hag hen a lavaro droc'h. »

Kerent an dall o devoa aoun da guezha dindan an eskumunugen a guezha dindanhi kement a anaveze Jezus evit ar C'hrist. Setu perak ne reont nemed kounta ar pezh a zo erruet hag e roont d'ho map ar garg da eslika an traqu var eon. Red eo d'ar barner digass adarre dirazha an hini a ioa bet dall.

« Guelomp, emezha. Komz gat lealdet ha rent gloar da Zoue. Me a oar e zeo an den-ze eur pec'heur. »

— Pec'heur eo pe n'e deo ; evidon-me ne ouzoun ket. Ar pezh a ouzoun eo oan dall ha brema e velan sklear.

— Mez gouskoude petra en deus-hen great d'id ; penaoz en deus-hen digoret da zaoulagad ?

— Her lavaret a meus deoc'h dija, emezha gat eun tamik goap ha va c'hlevet mad o c'heus. Perak e fell deoc'h va lakaat da zistrei var ar pezh a meus diskleriet ? A c'hoant a zo savet ganeoc'hui ive da veza he ziskibien ? »

N'o doa ket re a valloz evit ar baltek-se, a ioa bet divergont aoualac'h evit goapaat doktored Israel.

« Bez da unan he ziskib, emezho a bouez penn, evidomp-ni a zo diskibien Moizes. Gouzoud a reomp en deus Doue komzet oc'h Moizes ; mez ne ouzomp ket piou a gelen da brofed-te. »

D'ar moment-se, ene ar paour-keaz a resevas muic'h c'hoaz a sklerijen eget he zaoulagad hag e lavaras dispount ha gat nerz :

— « Ne ouzoc'h ket a berz piou e komz, a lavar hen d'ar Pharizianed, ha gouskoude en deus digoret d'in va daoulagad ! Hogen n'eus ket eun den a ne c'hoar ne vez ket ar pec'heur selaouet gat Doue ha ne ro Doue he c'halloud nemed d'an den a rent dezha enor hag a ra he volonte. A klevet o c'heus eur vech bennak en deffe eun den digoret he zaoulagad, roet ar sklerijen da eun den ganet dall ? Ma ne vije ket hema a-berz Doue, ne raffe ket kement a vuzudou. »

— Petra, a lavar ar Pharizianed e kounnar, (rak n'o doa netra da lavaret) te a zo ganet holl er pech'h hag e klaskez ober skol d'eomp-ni ! »

Kement a imor o doa outha ma oue eskummuget gatho ha taolet er-meaz evel eur paian hag eur publikan. Mez Jezus ne felle ket dezha lezer eb rekompans eun den ag en doa gat kement a nerz difennet ar virionez. Pa glevas oa kasset er meaz euz ar sinagog, e zeas d'he ziambrouk var an hent hag e lavaras dezha :

« A kredi a rit e map Doue ? »

— Aotrou, lavarit d'in piou eo, ha me a gredo enna.

— Her gullet o c'heus : Hen eo a gomz ouzoc'h.

— Ia, aotrou, kredi a ran, a lavar ar c'heaz eskummuget en eur guez a d'an daoulin. »

Jezus, neuze, dirak an holl, a damallas an dud fall-ze a zo bepred a enep ar virionez. « Me a zo deuet er bed-ma, emezha, evit ma velo sklear ar re a zo dall, ha ma teuo da veza dall ar re a vel sklear. » Ar c'homzou-ze a zisplij d'ar Pharizianed hag e c'houlennont digat Jezus ag ho c'hemeret a ra evit tud dall. — « Nan, emezha ; ma vijec'h bet dall, n'o pije ket bet a bec'hed ; hogen gullet a rit ha setu perak eo brassoc'h ho pec'hed. »

Truezi a ra goudeze var stad ar bobl paour-ze, a zo kuezet etre daouarn, ne ket pastored, mez bleizi. Lavaret a ra :

« Me eo ar pastor mad : ar pastor mad a ro he vuez evit he oaned. Mez an devezour, pa deu ar bleiz, a dec'h kuit hag a lez he oaned. Ia ; me eo ar pastor mad. Me a anavez va oaned ha va oaned am anavez, evel ma c'hanavezan va zad ha ma zoun anavezet gatha. Oaned all a meus c'hoaz a ne mañt ket euz ar c'hraouiad-ma. Red eo d'in ho diarbenn, ho digass ama evit ne vezo nemed eun torrad hag eur pastor ebken. Va buez a roin evit va oaned. Va buez a roin ; mez he lakaat a rin da zistrei. Rak Doue en deus roet d'in ar galloud d'her rei, hag ar c'halloud d'he c'hemeret adarre. »

He inimied, dre ma klevant he gomzou, a lavare : « Ne ket diez gullet ema an diaoul en he gorr pe e zeo diskiant. » Mez he ziskibien a lavare d'ho zro :

« Penaoz e c'hell eun den divar an diaoul digeri da-
oulagad eun den dall-ganet ? »

An divizou-ze a badas e ser pemzek dervezi Je-
zus a guiteas neuze Jerusalem evit ober eun droiad
dre ar Judee hag ar Peree.



VII.

MALEUR DEOC'H, PHARIZIANED !

Ar pez a rea muia poan da inimied Jezus eo
ar miraklou a rea. Kaer o devoa lavaret oa
eun den fall, eur blasfematour, an dud a
respounte dezho, evel an dall : « Doue ne
ro ket kement a c'halloud d'ar bec'heurien. » Setu
ma sao en ho spered ar zonzj da dremen Jezus evit
eun den possedet gat an diaoul. Eun devez, oue di-
gasset da Jesus eun den ag a ioa lakeat mut gat an
diaoul. Jezus a lakeas an diaoul er meaz hag ar
mut a gomzas. Ar bobl, test euz ar mirakl-se, a
rente mil meuleudi da Jezus hag a hanve anezha :
Map ar roue David. Ar Pharizianed en hem zil e
touez an dud hag a lavar dezho evel doktored :

« En den-ze, emezho, e zeus eun diaoul, ha
Beelzebud eo zo-ken, prins an diaoulou. »

Jezus a respountas dezho :

« Eur rouantelez, mar sao brezel enha etre
an dud, a zo e vont da netra. Eun tiegez, a n'eus
ennha nemed trouz, a ielo d'an traoñ. Mar d'ema,
evel a livirit, satan e c'hober brezel da zatan, ema
e c'hober brezel dezha he unan hag he rouantelez
a vezo diskaret, »

Ar Pharizianed ne gavent netra da lavaret. Mez
Jezus a boursuaz.

« Mar deo dre Beelzebud e kassan an diaoulou
kuit, dre biou e vezont-hi kasset kuit gat ho pu-
gale ? »

D'ar mare-ze e zoa ar pez a c'halver eksorsisted
ag a lakea an diaoul da dec'het en hano Jehovah
ha den n'ho c'hemere evit sorserien. Setu perak e
tisklerias dezho seac'h ha grons e vije lakeat ho
bugale d'ho barn.

« Ma ne ket dre un diaoul Beelzebud e lakaan an
diaoulou da dec'het, e tle beza eta dre vertuz
Spered Doue, eo diouezet eta en ho touez rouante-
lez Doue.

« Pa vez eun den krenv hag armou gatha e tioual
he di, ar pez en deus a zo diouallet mad. Mez mar
tiouez eun all krenvoc'h egetha, e prad anezha, e
tenn digatha he armou hag e kemer kement en
deus. Mez araok ober an troiou-ze, e stag anezha. »

Evel-se e ra ar Messias. Chadenna a ra Satan e
strad an iferniou, ha goude beza tennet an dud a
sklavaj, e laka he lezen da ren var ar bed. E leac'h
mont a-du gat hor Zalver, ar Pharizianed ne glas-
kent nemed ober drouk dezha e peb fessoun, evel
ken aliez a ziaoul. Mont a reant zo-ken bete lavaret
oa labour an diaoul ar pez a ioa great gat ar Spered
Santel.

Jezus a levaras dezho : « Hen diskleria a ran deoc'h, kement pec'hed a vo great ha kement blasfem a vo laosket a eneb mab an den, a ello beza pardonet. Mez ar blasfemou a enep ar Spered Santel ne vezint pardonet nak er bed-ma nak er bed-all. Da zeiz ar varn tud Niniv a en hem zavo a enep ar rumm dud a zo brema. Rak hi, da vihana, a reas pinijen pa zeas Jonas da brezek dezho. D'an deiz diveza, Rouanez bro ar c'hresteiz en hem zavo ive oc'h an dud' zo brema. Rak euz a bell bro eo deuet da glevet komzou ar fur Salomon. Hogen, an hini a zo ama a zo dreist Salomon. »

Adversourien Jezus a blege ho fenn ; mez ar bobl a gave kaer komzou hor Zalver. Eur c'hreg, laouenbraz, a lavaras : « Euruz an hini e deus ho touget ; eüruz ar vamm e deus ho maget ! » Mez Jezus evit rei eum tamm kentel d'an dud difeiz a ioa en-dro dezha, a lavaras : « Eürussoc'h c'hoaz ar re a glev komzou Doue hag a laka anezho da dalvoud. »

Nebeud goudeze, eur Pharizian a bedas anezha da breja en he di. Jezus a ieas var eeun oc'h taol. Mez ar Pharizian, etretant, a c'houlenne outha e unan perak n'hen doa ket goalc'het he zaoiarn araok ar pred.

Jezus a vele hipokrizi an dud fallagr-se hag a lavaras dezho :

« C'hui etrezoc'h, Pharizianed, a oualc'h dianveaz an tass hag ar plad : mez an diabarz a zo leun a laëronsiou hag a loustoni. Maleur deoc'h Pharizianed hipokrid, beziou guennet en dianveaz, eskern ha breinadurez en diabarz ; tud vad da velet, ha fall dirak Doue. Ne vankit ket da baca ho kargou ; Mez a hent-all, n'euz evidoc'h na justiss, na karantez.

« C'hui a dremen ho tour dre ar zil gat aoun da lounka eur gelienen hag e lounkit eur c'hanval. Maleur deoc'hui a glask ar renk kenta er sinagog hag en tachennoù publik ; a ia a dreuz dour ha douar evit gounid eneoù hag ober anezho danvez evit an ivern ! Maleur deoc'h ! »

N'eo ket eb abek e reas dezho Jezus ar rebechouze. Ar Pharizianed a zouble ho fenn. Gouskoude unan euz ho doktored en hem zavas a enep hor Zalver : « Mestr, emezha, ne lavarit ket eur gomz a ne ve eun dismegans evidomp ! » Jezus a bladas anezho dre ar c'homzou rust-ma :

« Maleur deoc'hui ive, doktored euz al lezen, a zalc'h en ho taoiarn alc'hoez an deskadurez, ne zeskit ket oc'h unan ha ne roit ket zo-ken konje d'ar re all da zeski ! Maleur deoc'h, hipokrited ; beziou kaer a zavit d'ar brofeted a zo bet lazetao ho tadou koz. Mes c'hui n'oc'h tam guelloc'h eget-ho. Setu perak e vezo red d'ar rum dud-ma respount evit an holl goad a zo bet skuillet var an douar abaoe Abel bete Zakarii, o c'heus lazetao etre an templ hag an aoter. »

Goude-beza gourdrouzet an dud-se a ioa e koll ar bobl, Jezus a dec'has dioutho evit mont da zavetei an eneoù paour o doa klasket da goll hag ho lakaat var hent ar zilvidigez.



VIII.

GOURDROUZOU HA TRUGAREZ.

JEZUS a i eas eur vech c'hoaz a dreuz ar Judee hag ar Peree da brezek dezo rouantelezh Doue. « Me zo deuet var an douar, emezha, da enaour eun tan sakr hag ar pezh a fell d'in eo e krokfe en holl galounou. Mez araok, me a ranko reseo ar vadiziant a c'hoaz. Nak a vall a meus e ve roet d'in ! Deuit eta davedon, emezha, c'hui holl sammet ha poaniet, ha me ho sikouro. N'eo ket diez va zervicha. Map an den a zo trugarezuz ; ne beur-voug ket ar vouchaden a zo c'hoaz ennhi eun eulfen ha ne dorr ket ar raosken anter vrurunet. Deuit, deskit ganhen-me e Zoun douss hag humbla galoun. » Ar vugale hag ar beorien, ker chentil oa, a iea betek ennha. Ar vugale no devoa nep aoun razha hag a vode zo-ken en dro dezha. An ebestel a fellas dezho ho c'hass kuit. « Nan, a lavaras hor Zalver en eur rei dezho he vennoz ; lezit ar vugaligou-ze da zont betek ennhon. D'ar re-ze eo rouantelezh an env ha d'ar rea zo henvel outho. »

D'ar bec'heurien e lavare ober pinijen hag eb dale. Eun dervez oa lavaret dezha en devoa Pilat lazet, en templ, eun niver a dud euz ar Galilee. « A kredi a rit, emezha, oant goassoc'h tud eget ar re

all ? Nan. — A c'hui, ma ne rit ket pinijen a varvo evel dho. An trivec'h den a ioa kuezet varnho tour Siloe, a sonjal a rit oant brassoc'h pec'heurien eget an dud all a Jerusalem ? Nan, a lavar an deoc'h ; ma na rit pinijen, e vezoc'h holl kollet. »

Evit distrei ar bec'heurien, e komze dezho euz ar maro. « Dont a rin davidoc'h evel eul laer. Ma ouezfe an tad a familh da be heur e tle al laer dont varnha, e chomje var evez ha ne lezfe ket al laer da vont en ti. Bezit eta prest ; rak map an den a deui pa zonzoc'h nebeuta. — Eun den a ioa ker pinvidik ma ne ouie e pe-leac'h gorroi he ed, ken na oa red dezha sevel grignoliou nevez. « Ehan brema, a lavare ennha e unan, dreb, ev, kemer da blijadur. » « Den diskiant, a lavar mouez an Aotrou Doue, en noz-ma e vazo tennet da ene diganhez ! » Jezus a lavare c'hoaz ar barabolen-ma d'ar re a fizie var an amzer da zont. « Eun den en devoa eur vezen fiez plantet e kreiz he viniennou. Evel ne zouge ket a frouez, e lavaras da baotr ar guiniennou : « Setu a-ma tri bloaz ema ar vezen-ze a-ze e koll douar ; troc'hit anezhi. » « Mestr, eme ar gunier, gortozit bloaz gathi. Me a ia da derri an douar tro-var-dro, da lakaat teil gathi ha marteze e tougo frouez. Ma ne ro ket, e lakeoc'h he zrouc'ha. »

Jezus ne c'houzanve ket an dud ourgouilluz. « Daou zen, emezha, a ioa pignet d'an templ, unan Pharizian, egile publikan. Ar Pharizian a bede evel-hen. « O Doue, me ho trugareka dre ne doun ket evel an darn vuia euz ar re all, laer, disleal, libertin, na zo-kenevel ar publikan-ze. Me a iun diou vech er zizun hag a ro an deok euz va danvez. — Ar publikan, e traon an templ a skoe var he beultrin hag a lavare :

« Aotrou, o pezet truez ouzin ; rak me a zo eur paour-kez pec'heur. » Me her lavar deoc'h, hema a zo distroet santel d'ar gear, mez non paz egile. Rak kement hini en hem zao a vezo diskaret, hag ar re en hem izhela a vezo huelleat. »

Avechou, e skoe ive var an dud avarisiuz ha displeal. « Diessoc'h eo, emezha, d'an den pinvidik mont da rouantelez Doue eget na deo lakaat eur gorden da dremet dre graquen eun nadoz. » — Ar Pharizianed a c'hoarze goab dezha abalamour d'he gomzou. Mez Jezus a lavaras : « Eun den a ioa pinvidik-mor. Guisket oa gat mezer fin ha bemdez e veze fest en he di. E c'harz he zor, e zao eur paour hanvet Lazar, goloet a c'houliou, ag a vije bet joa gatha kaout ar bruzunachou a goeze divar an daol. Hogen ne vezent ket roet dezha. Mez ar chass, dre ma zeant ha ma teuent, a lipe he c'houliou. Lazar a varvas hag a oue douget gat an elez da balez Abraham. Ar pinvidik a deuas ive he dro da vervel ag a oue sebeliet en ivern. Euz a greiz an tan evelas Lazar, ha setu hen da grial : « Abraham, Abraham, dre dreez ouzin, digassit Lazar beteg ennhon. Grit dezha souba ebken penn he viz en dour evit distrempa d'in va zeod. Rak leski a ran skrijuz e kreiz ar flammou-ma. — Sonj ervad, a respont dezha Abraham, e c'heus bet peb tra epad da vuez hag heñ n'en deus bet nemed dienez. Brema ema er joa ha te a zo er boan. Keit a zo entrezomp ma na eller ket mont ac'han du-ze, riak a zu-ze dont ama. »

Prezek a rea ive a enep ar re a zistro an eneu dioc'h rouantelez Doue dre ho c'homzou pe ho skoueriou fall. « Maleur d'ar bed, emezha, abala-

mour d'ar skoueriou fall ! Maleur d'an den a skouer fall, d'an den a zesk an drouk da unan bennak euz ar vugaligou-ma. Guelloc'h e vije bet dezha e vije staget eur mean milin dezha ouz he c'houzoug ha ma vije bet stlapet e strad ar mor ! Mar d'eo ho tourn kirriek deoc'h da bec'hi, trouc'hit-hen ; mar deo ho lagad kirriek deoc'h da bec'hi, tennit-hen. Rak guelloc'h eo mont d'ar baradoz gat eun dourn hag eul lagad ebken eget beza taolet er fourniez tan ne vo morse mouget, el leac'h ma zoar krignet gat eur preon ne varv ket, ha devet gat eun tan ag a bado da viken. »

Pa zistroe eur pec'heur bennak divar an hent fall, e tiskueze dezha ar brassa karantez ken na gave ar Pharizianed abek ennhu : « An den-ze, emezho, n'oar ket derc'hel he renk. Digemer a ra ar bec'heurienn ; preja' ra gatho ; ne deo na profed na den Doue. » Mez Jezus a gav an tu da stanka dezho ho ginou : « Mar deus unan bennak en ho touez, emezha, ag en deffe kant danvad, mar tiouez da unan bennak anezho dianka, daoust a ne lezo ket an naontek ha pevar-ugent all evit mont da glask an hini a zo kollet ? Redek a ra var he lerc'h ken na gav anezha. Neuze her laka laouen-braz var he chouk hag hen digass d'ar gear. Gervel a ra neuze he vignouned hag he amezeien hag e lavar dezho. « Kemerit perz em joa. Rak va danvad a ioa dianket hag a zo adarre kavet. Setu penaoz ive e vezo muioc'h a levenez er baradoz evit eur pec'heur a ra pinijen eget evit naontek ha pevar ugent den chommet ato var an hent mad ha no deuz ket ezom da ober pinijen. »

Goudeze, Jezus a ziskuezas pegen trugarezuz eo

he galoun dre eur barabolen a ne elle beza kavet nemed gat eun Doue.

« Eun den en doa daou vap. Ar iaouanka, douget gat he dechou fall, a lavaras d'he dad : « Roit d'in al loden a dle dont d'in euz ho c'heritaj. » An tad a rannas he zanvez ag a roas dezha he lod. Ar penn-skanv-ze, nebeud derveziou goudeze, a iegas da foueta bro. Pell e zeas dioc'h ar gear. Eno e vevas e goal goupagnunez hag e tispignas he beadra. Siouaz dezha ! e tirollas var ar vro eur ger-nez vraz ha setu hen eb dale, eb arc'hant na bara. Ne ouie petra da ober. Kentoc'h gouskoude eget mervel gat an naoun e zeas e koumanant gat eun den pinvidik euz ar vro. Hema a gassas anezha da zional he voc'h ha ne roe dezha koulz lavaret netra da zribi. C'hoant en doa da ranna gat he loened ar fa gouez a vije roet dezho. Mez n'oa ket konje. »

Dont a ra mez dezha pa zonz e pe stad eo kuezet. — « Nak a vevelien, e ti va zad, emezha, ag o deus bara da zribi kement a ma karont ! A me a varv ama gat an naoun ! Mad ; me ielo ac'hann etrezek va zad hag a lavaro dezha : « Va zad, pec'het e meus a enep Doue hag a enep-d'oc'h. N'oun ket din mui da veza hanvet ho map : mez grit d'in evel d'an disterra euz ho servichourien. »

Kerkent, e kemer hent ar gear. Pell oa c'hoaz dioc'h an ti pa velas he dad anezha hag he anaout a reas zo-ken en desped d'an truillou a ioa en dro dezha. Truez en devoue outha. Mont a reas da ziambrouk he vap, her briata' ra ; poket a ra dezha. — « Va zad, a lavar ar c'heaz den iaouank en eur ouela a-forz, pec'hi am eus great a enep Doue

hag a enep-d'oc'h. N'oun ket din mui da veza hanvet ho map ! » Mez an tad en doa ankounac'heat an amzer dremenet.

« Buhan, emezha d'he zervicherien, buhan ama d'am map eur zae euz ar re gaerra ; lakit dezha eur bizou var he viz hag eur boutou nevez en he dreid. Lazit ive eul leue lard ma vezo great fest. Rak va map ioa maro ; ha setu-hen deuet da veo ; kollet oa ha setu-hen kavet. »

Ar Pharizianed n'o doa netra da lavaret, netra da damal e trugarez an Aotrou Doue, hag ouspenn an dud a ioa oc'h her selaou a ioa dija an dour en ho daoulagad.

Jezus a berechuas he barabolen evit rei da entent d'ar Pharizianed peger kriz oant.

« Holl oant oc'h taol ha kalz laouenidigez a ioa, pa ziouezas ar map hena d'ar gear. Mantret o klevet muzik ha trouz, e c'houlenn petra' zo a nevez. « Ho preur a zo distro, oue lavaret dezha, hag ho tad en deus great laza al leue lard en he enor. » Pa glevas kement-se, e zeas drouk ennha ha ne felle ket dezha zo-ken mont en ti. He dad a deuas d'he gaoud ha da gomz outha dre gaer. Mez hen a respountas seac'h : « Kement all a vlaveziou'zo e maoun en ho servich, eb beza dizentet ouzoc'h eur vech, ha morse n'o c'heus roet d'in an disterra gavrik da ober fest gat va mignoured. Ho map a zistro d'ar gear goude beza dispignet he zanvez gat merc'hed fall ha dioc'h-tu e lazit al leue lard evitha ! »

« Va map, a lavar ar c'heaz koz, c'hui a zo bepred ganhen ; kement a zo d'in-me a zo deoc'h. Mez, hirio eo red ober fest ; rak ho preur a ioa

maro, ha setu hen adarre beo; kollet oa ha setu hen kavet adarre. »

Ar Pharizianed a ioa imor ennho abalamour Jezus a zeblante beza muioc'h douget ne ket ebken evit bugale Abraham, mez c'hoaz evit an idolatred hag ar baianed eget evit-ho. Ne ententent ket e vije digoret rouantelez Doue da eur paian.

« Mestr, a c'houlenne digatha eun doktor, a bihan eo niver an dud a die beza euz ho rouantelez ? »

« Poagnit da vont dre an hent striz, a lavar dezha hor Zalver. Kalz tud a glasko mont ebarz ha ne deint ket. Pa en devezo an tad prennet an or, kaer o pezo skei varnhi a-zianveas ha lavaret : « Aotrou, digorit d'eomp. An Aotrou a respounto : Me ne ouzoun ket euz a beleac'h e teuit. — Ni or beus drebet hag evet ganeoc'h : C'hui a zo bet e kelen ac'hanomp. — N'ho c'hanavezan ket ; tec'hit diouzin, micherourien an diaoul. » Ouela a reoc'h, straka' rei ho tent pa yeloc'h Abraham, Isaac'h, Jacob hag an holl brofeted e rouantelez Doue ha c'hui taolet er meaz. Dont a reor euz ar sao-heol hag euz ar c'huz-heol, euz an anter-noz hag euz ar c'hresteiz, da gemeret plass e rouantelez Doue hag evel-se ar re genta a deui da veza ar re ziveza ; hag ar re ziveza a vezo ar re genta. »

Pa glevant oant taolet a-gostez, ar Juzevien a skrigne ho dent. Jezus a lavaras dezho perak.

« Eun den, emezha, en doa great eur fest braz ha pedet kalz tud da leina. Da heur ar pred, e reas lavaret d'ar re a ioa pedet, oa prest peb tra. Hogen, unan a lavaras : « Me a meus prenet eur goumanant hag a zo red d'in mont d'he guele. — Eun

all a lavar : « Pemp koublad ejenned a meus prenet ; red eo d'in chomm d'ho essa. — Eun trede a lavar : « Me zo e paouez dimezi, ne c'hellan ket mont Iskuzit ac'hanon. » An tad a famill a ia drouk enna hag a lavar d'he vel : « Kerz dre blassen-nou ha ruiou kear ha digass ama d'in-me ar beorien, ar re gamm, ar re zall, ar re mac'haniet. Ar mevel a zentias ha goudé m'hen deus great tro kear, e teu da lavaret d'he vestr e zeus c'hoaz plassou gullo er zal.

« Kent-a-ze, kea dre an hentchou, a ed ar c'hleuziou ; digass kement a gavi ; rak, her lavaret a ran d'id, ne vezo ket unan ebken euz ar re a zo pedet e tanva euz ar banket. »

An tremenidi-ze a verke ar baianed. Mez Doue ; a rei a elle d'ar re zivezata-ma kement a da vugale Abraham, chommet epad daou vil bloaz fidel d'an allians great gat Doue. Jezus a respount dezho dre ar barabolen-ma.

« Eun tad a famill a ieas mintin-mad da glask tud dioc'h an deiz da labourat en he vinien. Gobret oant eun diner bemdez. D'an trede heur, e kassas lod all. D'ar c'huoc'hved ha d'an naved heur, e kassas diou vanden all. Erfin, vardro unneg heur, e velas tud dilabour var ar blassen hag e lavaras dezho : « Petra eo deoc'h chomm a-ze da feneanti e doug an deiz ? — N'eus bet den e klask ac'hanomp, emezho. — Kit ive da labourat em park guiniennou. Pa deuas an abardaez, ar mestr a lavaras d'ar mevel braz rei ho fae d'al labourerien ha rei da genta d'ar re a ioa deuet da ziveza. Ar re a ioa deuet da unneg heur, oue roet dezho bep a ziner. Ar re-all a c'hortoze brassoc'h pae ; mez no

devoue ken nebeud nemed eun diner. Sevel a ra grozmol entrezo. « Petra ! a lavarent-hi, ar re-ma n'int bet nemed eun heur e labourat ag a reseo kement a ni a zo bet e doug an deiz e tougen ar bouez pounner euz al labour hag euz ar c'hroez ? — Va mignoned, a lavar mestr an ti, a n'o pœa ket great marc'had ganhen evit eun diner ? Kemerit ar pezh a zo deoc'h ha kit gat ho c'hent. Me a fell d'in rei da hema kement a deoc'h ; piou a elfe miret ouzin. Daoust a pikouz eo deuet ho taoulagad abalamour ma zoun-me mad ?

« Setu penaoz, a lavar Jezus, en eur echui, e vezo ar re ziveza da genta, hag ar re genta da ziveza. »



IX.

LAZAR E SEVEL EUZ AR BEZ.

D'AR 25 a viz kerzu e tioueze gouel an dedi, e memor euz an deiz m'en doa Judas Makabee purifiet an templ a ioa bet sotret gat Antiokuz. Tostaat a rea evitha an deizioù diveza ha setu hen e vont d'ar gouel. Edo e vale e diabarz an templ, dindan porched Salomon, pa zierollas varnha eun toullad doktored, hag a lavaras dezha diskleria sklear ar pezh a glaske. « Pegeit

amzer c'hoaz e lezoch ac'hanomp var var ? Mar doc'h ar C'hrist, perak n'her livirit-hu ket deomp ?

— Petra dal d'in-me lavaret d'eo'h oun ar C'hrist, pa zeo guir n'am c'hredit ket ? Ar pezh a ran a-berz va Zad a rent testeni evidon. Mez c'hui n'am c'hredit ket abalamour n'oc'h ket euz va oaned. Va oaned-me a glêv va mouez hag a deu d'am heul. Me a ro dezho ar vuez a bado atao ha den ne ello ho zenna diganhen. Va Zad eo en deus ho roet d'in. Muio'h a c'halloud en deus eget peb hini, ha den ne denno anezho digatha. Va Zad ha me ne reomp nemed eun Doue ebken. »

Ar Juzevien pa glevent ar c'homzou-ze a ia en egar hag a zastumas mein evit he laza. Mez Jezus a lavaras dezho ker brao a tra : « Kalz burzudou a meus great dirazoc'h en hano va Zad ; evit pehini e fell deoc'h va laza a daoliou mein ?

« N'e ket evit an traoù mad a c'heus great, e fell d'eomp da labeza a daoliou mein, mez abalamour ma c'heus blasfemet o lavaret, paour keaz den, e zoas Doue. »

Jezus a respountas dezho : « Mont a rit a enep ar Skritur ; ha gouskoude ar Skritur ne ell ket beza dislavaret. A n'eo ket skrivet en ho lezen divar benn ar re a gomz outho an Aotrou Doue : C'hui a zo doueou ? Mar gra ar skritur doueou euz an dud-se, perak e livirit-hu euz an hini a zo bet santeleat gat an tad ha digasset gatha er bed-ma ? Blasfemi a rit, abalamour e meus lavaret oan map Doue. Eur vech c'hoaz, ma ne ran ket oberou va Zad, ne gredit ket ennon. Mez ma ran he oberou, kredit da vihana d'an oberou-ze hag anzavit ema va Zad ennon hag emaoun enna. »

Ar Juzevien a glaskas kregi ennha adarre; mez en hem denna a reas a dre ho daouarn dre he holl-c'halloud hag e zeas en tu all d'ar Jourden, e Bethabara, el leac'h m'oa bet Iann e rei he vadiziant. Eno e chommas epad amzer ar glaoeier. Euz kement korn a ioa er Peree hag er Galilee e teuet d'he gaout. Kalz a gredas ennha abalamour d'ar miraklou a rea. « Iann n'en deus ket great a vuzudou, emezho; mez guir eo kement en deus lavaret divar benn ar profed. » Jezus a veve eno didrabas, pa zavas adarre eun tamik abaden.

Lazar, he vignoun euz Bethanii, a ioa kuezet goal glañv. Martha ha Mari a gassas kannad dezha en tu all d'ar Jourden gat ar c'hemzou-ma ebken : « Aotrou, an hini a garit a zo klañv. » An diou c'hoar a zanje dezho e vije deuet dioc'h-tu Jezus hag en dije pareet ho breur. Mez Jezus eb ober van koulz lavaret, a respountas : « Ar c'hlenved a zo peg ennha ne gass ket d'ar maro, mez da c'hloar Doue; ha map Doue a vezo glorifiet dreizha. » Ar c'hannad a zistroas da Vethanii; mez Jezus a zaleas daou zervez c'hoaz el leac'h ma edo. E Bethanii, oa mall d'he velet. Rak ar c'hlenved a iea var ouassaat ha Lazar a varvas. Neuze Jezus a lavaras d'he ziskibien :

« Distroomp d'ar Judee. »

— Mestr, emezho, n'eus ket pell c'hoaz ar Juzevien a glaske ho lakaat d'ar maro hag e lavarit distrei d'ar Judee ? »

Evit tenna ar spount digatho, e lavaras dezho n'oa ket pe adra da gaout aoun c'hoaz.

« Hor mignoun Lazar a zo kousket, emezha, hag e rankan mont d'he zihuna.

— Ma ne deo nemed kousket emezho, e pareo. »

Pa ell ar c'hlanvour kousket, e zeo sin vad. Lazar a zo e vont da barea. Perak eta distrei d'ar Judee ? Jezus neuze a lavaras dezho sklear :

« Lazar a zo maro. Joa eo ganhen n'oa ket eno, evit ma kredoc'h ennhon. Deomp da Vethanii. »

Kement a aoun o doa rak ar Juzevien ma o devoa diskibien Jezus diegi e vont d'he heul. Mez Thomas a lavaras dezho : « Deomp assamez gatha, ha marvomp gatha m'ar bez red. » Edont e vont e kear pa glevehont oa maro Lazar abaeue pevar dervez.

Ervez ar c'hustum er vro-ze ar c'horv a ioa bet goalc'het, lakeat varnha louzeier a c'huez-vad, seizennet penn-da-benn ha diskennet er bez. Adalek neuze e teuet bemdez d'ar bez. Kerent, eleiz mignouned, Juzevien a renk huel deuet euz Jerusalem a ioa e kaoñ en dro d'an diou c'hoar glac'haret. Ne glevet nemed hirvoud ha klemm. Ar pevare dervez oa. Douetans ebed na doa maro. Al linser a oue astennet var he benn hag eur mean braz a oue lakeat var ar bez.

Epad m'edo gat ho c'herent an diou c'hoar beuzet en daelou, e teuer da lavaret da Vartha eo diouezet Jezus. Martha a ia raktal d'he ziambrourk.

— « Mestr, emezhi, pa erruas gatha, ma vije c'h bet ama, hor breur ne vije ket maro. Brema c'hoaz, me a zo sur, kement a c'houlennoc'h digat Doue a vezo roet deoc'h. »

Jezus a ra an neuz da zrouk-entent ar pez a lavar : « Ho preur, emezha, a deuio adarre da veo.

— Ia; gouzoud a ran e teui adarre da veo en deiz diveza euz ar bed.

— Martha, me eo ar rezurreksion hag ar vuez. An neb piou bennak a gred ennhon; a pa ve maro, a vevo; hag an neb piou bennak a gred hag a vev ennhon-me, ne varvo morse. A kredi a rit kement-se ?

— Ia, Aotrou, kredi a ran e zoe'h ar C'hris, map Doue, diskennet er bed-ma. »

Martha a zo mall gathi mont da gaout he c'hoar da lavaret dezhi edo Jezus eno. Lavaret a reas dezhi goustadik : « Ar mestr a zo deuet hag a c'houlen komz ouzoe'h. Kerkent Mari a ia euz an ti evit mont da gaout Jezus. Ar Juzevien a zonje edo e vont d'ar bez hag a ias d'he heul.

Pa erruas el leac'h ma e doa Martha kavet Jezus e c'hen hem daolas e c'harz he dreid ha ne el-las miret da lavaret dezha evel he c'hoar : « Aotrou, ma vijec'h bet ama, hor breur ne vije ket maro. » Ouela' rea a-forz hag ar Juzevien a ouele assamez gathi. Pa vel Jezus an daelou-ze, e oue tenereat he galoun hag e c'houlennas :

« E pe leac'h o c'heus lakeat Lazar ?

— Aotrou, ni ia d'ho kass beteg ar bez. »

Jezus a ia d'ho heul ha Jezus a ouele ive ; ar pezh a reas d'ar Juzevien lavaret : « Guelit pegement her c'hare ! » Hogen lod all, tud prest da gaout abek e pep tra, a lavare d'ho zro. « Digoret en deus he zaoulagad d'an den ganet dall ; perak n'hen deus-hen ket miret oc'h Lazar da vervel ? » Gouskoude Jezus a ia beteg ar bez, eur c'hañ kleuzet er roc'h ha lakeat varnha eur mean brañ d'he stanka.

« Tennit ar mean, emezha.

— Mestr, a lavar Martha, pevar dervez a zo abaoue ma zeo maro : c'houez fall a vo gatha.

— A ne meus-me ket lavaret deoc'h e veloc'h gloar Doue, mar kredit ? » Lamet oue ar mean hag an holl a velas Lazar, al linser en-dro dezha. Jezus a zao he zaoulagad etrezek an eñv hag a bed : « Va Zad, emezha, ho trugarekaat a ran da veza selaouet va feden. Gouzoud a ran ne vankit morse d'am zelaou ha ma komzan evel-se eo abalamour d'an dud-ma a zo en-dro d'in evit ma kredint oun deuet euz ho perz. »

Asten a ra neuze he zourn a-zvoud ar c'horv maro hag e lavar dezha gat eur vouez kreñv :

« Lazar, savit euz ar bez ! »

An hini maro a finvaz hag a deuas er meaz. He dreid hag he zaouarn a ioa lassou lieten en dro dezho hag he vizaj a ioa goloet gat al linser. An dud a ioa seziat. Edont evel tud mut ha den ne grede lavaret grik.

« Tennit al lassou divar he dro, eme Jezus, ha lezit anezha da vale. »

Great oue ervez ma c'houlenne, ha Lazar a oue guelel leun a vuez.

Pa veljont ar mirakl-se, unan euz ar re gaerra great gat Jezus, eul loden vraz a dud a gredas ennha. Lod all gouskoude, sperejou troet fall, a ias divar err da gounta d'ar Pharizianed petra'ioa c'hoarvezet. Dioc'h ma lavarent, ar bobl a-bez a ioa prest da vont a-du gatha.

Ar re-ma a gemer aoun ha setu ma zeo galvet ar c'honseill braz, an dud koz, ar veleien, an doktored, da velet petra vezo great euz a brofed Nazareth. Ar Saduseaned a ioa evit ma vije lakeat d'ar maro. « An den-ze, emezho, a ra kement a vurzudou ma zeo poent hen diarben. Anez kement-se ar bobl

holl a gredo e zêo ar Messias promettet ha gortozet evit savetei Israel. Ar Romaned, d'ho zro, a devio hag a zistrujo hor c'hear hag hon tud. »

An darn vrasa euz ar Pharizianed ne fell ket dezho gouskoude barn an den-ze d'ar maro, var an taol, eb beza great enklask, eb beza he glevet. Mez Kaifaz, belek braz er blavez-se, douget evit ar Sadsuceaned, a lavaraz dezho : « Tud dientent oc'h var an traou-ze. A ne ouzoc'hu ket eo kalz guelloc'h e varfe eun den ebken evit ar bobl ha ne ve ket-kollet arvro a-bez ? » Doue e unan en doa lakeat ar gomz-se var teod ar belek braz. Merka a reaevel-se e thie Jezus mervel, ne ket ebken evit ar bobl a Israel, mez evit an holl boblou euz an douar hag e felle dezha ober anezho holl eur memez famill, bugale an Aotrou Doue. Evel-se ec'h echuas gatho an abaden. An eskummunugen vraz oue laosket varnha. N'en doa ket konje da vont mui d'ar sinagog, ha pep hini a dlie diskulia e pe leac'h edo. Adalek neuze, n'oa ken frouden en ho fenn nemed gouzoud penaoz kregi ennha hag her lakaat d'ar maro.

Jesus a ziousallas ive da vont a-vel. Pellaat a ra dioc'h Jeruzalem hag e za, gat he ziskibien, e tu an anter-noz, da eur gerik hanvet Efrem. Eno, tost d'ar Jourden, e kichenik ar gouelec'h, e c'hortozas an deiz hag an heur ma vije plijet gatha en hem lakaat etre daouarn he vourrevien.



X.

DIVEZA BEAJ.

Dek dervez araok goueliou Pask, epad m'edo an dud e pignat da Jerusalem, Jezus a zisklerias d'he ebstel e vije eat ive d'an templ : rak deuet oa he heur. Ar re-mane ouient petra da zonzal. Pe heur ar viktor oa pe heur ar maro ? Dioc'h guelet labour ar juzevien e zoa leac'h da gaout aoun. Setu perak oant mantret e velet Jezus e vont da Jerusalem. Mez Jezus a iea er penn-araok evel eur c'habiten dispount epad ma krenent gat aoun. Ed an hent, e tigassas da zonz dezho c'hoaz euz ar pez en doa lavaret diagent. « Setu, emezha, e maoump e pignat da Jerusalem. Eno ema e vont da c'hoarvezoud kement o deus skrivet ar brofeted divar benn map an den. Lakeat e vezo etre daouarn prinsed ar veleien hag ar re-ma her barno d'ar maro. — Lakeat a vezo e galloud ar Baianed. Ar re-ma her goapai, her skourjezo, her fasato, a graincho ouz he vizaj hag her lakai d'ar maro. Mez da benn tri dervez, e teuo a varo da veo. » An ebstel ne gomprenent an traou-ze nemed var anter. Ar pez a jommas en ho spered eo e vije deuet Jezus da veo a-benn tri dervez hag e thie neuze sevel he rouantelez ha diskar heimied. Setu eta mam Jakez ha Iann, plac'h a foug, a deu da gaout Jezus hag a lavar dezha. « Aotrou, roit d'in ho ker e lakeoc'h va daou vapan

ho rouantelez unan en tu deou deoc'h hag egile en tu kleiz.

— Ne ouzoc'h ket petra' c'houlennit, a lavar Jezus d'an daou vreur. A goest oc'h da eva ar c'halir a meus-me da eva? ha da reseo ar vadiziant a vezo roet d'in-me?

— Ia; goest oump, emezho. » Rak ne ouient ket oa menek euz eur c'halir c'huero, euz ar bassion.

Jezus a lavaras dezho : « Eva a reoc'h euz ar c'halir-ze; mez var ar poent beza azezet en tu kleiz pe en tu deou d'in, va Zad eo ha n'e ket me a ro ar plassou-ze, d'ar re hen deus choazet. »

An dek all pa glevont kement-se, a ia drouk ennho. Perak e vije lakeat bugale Zebedee er renk kenta? Jezus a gavas eno an tu da rei dezho eur gentel var an humilite.

« Ar rouanez, emezha, a ra ho mistri var ar bobl hag a ziskuez dezha aliez en deus peb galloud varnha. Evidoc'hui ne vezo ket evel-se. Ar c'henta, en hotouez, a vezo servicher d'an holl. Rak map an den ne ket deuet er bed-ma evit beza servichet, mez evit servicha ha rei he vuez evit prena ar bed. »

Epad ma komze en doare-ze gat he ziskibien, e vode en-dro dezha kalz pelerined ag a ioa joa gatho guelet eur vech c'hoaz ar profed. E kichen Jeriko, oa kement a emgroaz ma c'houlennas Bartimee euz pe du e tene an trouz-se. Bartimee a ioa eun den dall, azezet var bord an hent hag eur c'hamarad dall a ioa ouspenn en he gichen. Lavaret a rear dezha ema Jezus a Nazareth e vont da dremen en he gichen. Neuze, evel pa vijent bet sklerijennet gat Doue, en hem lakeont o daou da grial a bouez-penn : « Jezus, map da Zavid, o pet truez ouzomp. » Dre ma tostea hor Zalver, e krient goassoc'h goaz,

ken na deuas ar re a ioa er penn araok d'ho c'haout ha da lavaret dezho tevel. Mez ar re-ma a zirollas da grial kreñvoc'h eget biskoaz : « Jezus, map David, opezet truez ouzomp : » Jezus a jommas eur pennadik a-za hag a lavaras digass dezha an dud-se. Lod a ieas d'ar red da gaout Bartimee hag a lavaras dezha : « Fizians ! ar mestr a c'halv ac'hannoc'h; savit en ho sa. Bartimee a daolas eno he vantel hag a ieas bete Jezus gat he gamarad.

« Petra a c'hoantañt kaout diganhen-me, a lavar dezho ar Zalver?

— Aotrou, grit ma velin sklear, a respount ar c'heaz dall.

— Savit ha guelit sklear; ho feiz e deus ho saveteet. »

Kerkent daoulagad an daou zen d'all a zigoras ha mont a reant da heul Jezus en eur veuli Doue. Ar bobl holl, pa vel eun henvelep burzud, a drugareka an Aotrou da veza digasset ar profed-se dezha. Jezus a ieas eta e kear Jeriko, en-dro dezha eun niver a dud leun a levenez.

Epad m'edo e vont dre ar ruiou, eur penn-braz e touez ar publikaned, he hano Zachée, pinvidik mor, mez disprijet abalamour d'he vicher en devoa c'hoant braz da velet ar profed-se a Nazareth, en doa Klevet komz anezha ken aliez. Evel ne c'helle ket tostaat outha abalamour d'an emgroaz nak he velet abalamour ma zoa bihan a vent, e redas araok hag e pignas un eur vezen Sikomor, var an hent a ranke hor Zalver da ober. Chouchet a-dreñ an deillou, Zachée a velas ar mestr divin e tont. Sellet a rea gat dudi ouz ar vizaj koant-se a ioa varnhi tress ar vadelez. He galoun a ioa eat bihan, pa jommas Jezus a-za dindan ar vezen ha p'her galvas dre he hano.

« Zachee, eme ar Zalver, diskennit buhan rak me fell d'in mont hirio da loja en ho ti. »

Ar publikan a ziskenn euz ar vezen laouen-bras hag a gassas Jezus d'he di. Ar Pharizianed ha zoken an diskibien a c'hros-mole abalamour ma reakement evit eur c'hoz-resevoir ar c'hargou. Zachee a ioa muioc'h estounet c'hoas eget ar re-all, e velet ar vadelez a ziskueze Jezus dezha; mez kenteliet gat Doue e chench evel eun all en he blass.

« Aotrou, emezha, an anter euz va madou a roan d'ar beorien. Ma meus great drouk da unan bennak, me fell d'in rei en-dro-pevar evit unan. »

— Zachee, eme ar Zalver, hirio eo deuet ar zilverigez en ti-ma. — Hema, emezha d'ar Pharizianed, a zo guir vap da Abraham; ha deskit mad eun dra : « Map an den a zo deuet var an douar da glask he da zavetei ar pezh a ioa kollet. »

C'huoc'h dervez araok ar Pask, Jezus a guiteas Jeriko evit pignat da Jerusalem. Kalz tud a ioa en dro dezha abalamour ma sonjent oa deuet tost ar mare evitha da zevel he rouantelez, en desped d'ar Pharizianed ha d'ar re all. He gompagnunez a ias tre bete Jerusalem; mez Jezus a jommas da dremen an noz e Bethanii, e ti Lazar. Pebez joa evit an dud vad-se gullet Jezus adarre. Mez ive pebez doan, pa zonzent edo e vont da guezha etre daouarn he inimied !

E touez ar pennou braz, e Bethanii, oa eun den ag a ioa bet pareet guechall gat Jezus euz al loren-tez. N'hen doa ken hano nemed Simon al lor. Diskib karantezus oa da Jezus hag e pedas anezha da zont da goania en he di gat he ebetel ha Lazar he vignoun. Martha evel kustum, a zerviche oc'h taol.

Setu ma teu eur vaouez er zal, gathi en he daou-

arneur pod alabastr leun a louzeier a c'huez-vad hag a gouste kalz arc'hant. Bloaz araok er memez ti ive epad ar pred, pec'herez Magdala, (rak hi oa) a ioa bet pardonet gat ar Zalver. Brema, leun a anaoudegez vad, en hem-daol adarre e c'harz he dreid; ho frotta' ragat he louzeier a c'huez-vad hag e sec'h anezho gat he bleo. Terri a ra neuze ar pod hag e taolas var benn Jezus ar pezh a jomme c'hoaz enna, en henvelep fessoun m'oa leunet an ti gat eur c'huez dispar.

Ar re a ioa oc'h taol a evessea mad. Ar Juzevien a ioa ar c'hiz gatho da derri eur pod, e kreiz ar fest, evit digass da zohj d'an dud, e kreiz plijadureziou ar bed-ma, peger bresk eo buez an den. Mari, pa dorras he fod e c'harz treid hor Zalver a verke dre gement-se oa tost heur ar bassion evel a lavare ar mestr he unan. Tostaat a reas buhan heur an disparti. Holl assamez gat Mari e felle dezho renta enor ha meuleudi da Jezus, pa glevchot e touez an diskibien mouez eun den drouk-koutant. Tenval he benn, ha sioul bete neuze, Judas a lavar : « Perak mont da goll traoù ker ker. Daoust a n'oa ket guelloc'h guerza al louzeier-ze ha rei an arc'hant d'ar beorien ? »

Lod a gave mad ar pezh a lavare, abalamour ne ouient ket perak e komze an abostol-ze evel a reas. Judas n'oa ket e poan gat ar beorien; mez ar ialc'h a ioa gatha ha laer oa. Keuzi a reas d'an tri c'hant pezh dispignet gat Mari. Ouspenn-ze ne gare ket mui he vestr abalamour ma vele er-vad ne doa nemed poaniou ha trubuilhou evit Jezus iviziken ha marteze e vije paket ive en abaden. « Perak, emezha, renta kement a enor d'an den-ze, n'euz ken kaoz gatha nemed euz he rouantelez ag a jomm

atao eun den a netra hag eur paour keaz ? »

Jezus a vele sklear en ene-ze gounezet gat an diaoul hag a respountas dezha : « List ar vaouez-se ; eun dra vad e deus great evidon. Rak an dra-ze a zervicho a-benn an deiz ma vezin lakeat d'ar maro.

« Peorien o pezo bepreden ho touez hag e c'helloc'h ober vad dezho. Hogen me ne vezin ket ganeoc'h atao. C'hui a damall anezhi, ha me a lavar deoc'h : « Dre ar bed-holl, e kement leac'h ma vezo prezeget an aviel, e vezo kountet ar pez e deus great ar vaouez-se evit va enori. »

Siouaz ! koan Bethanii oue fest ar c'himmiad. Dija an treitour Judas, poulzet gat Satan, a glaske an tu d'her guerza ; hag ar Pharizianed, e-kuz, a glaske ive an dro da gregi ennya. Ema ar zizun santel e vont da zigeri.



TAOLEN.

	PAJEN.
I. Diezaman	5
II. Phenisii ha Dekapool.	13
III. Traou dudiuz	18
IV. Jezus a guita ar Galilee	23
V. Gouel an teltou	28
VI. An den ganet dall.	32
VII. Maleur deoc'h, Pharizianed.	40
VIII. Gourdrouzou ha trugarez	44
IX. Lazar e sevel euz ar bez	52
X. Diveza beaj.	59

